

PAOL VI

**KELC'HELENN
POPULORUM PROGRESSIO**

Diorreadur ar pobloù

Troidigezh gant Jil EWAN

PREDER

Kaier 119-120

Mae - Mezheven 1969

PAOL VI

KELC'HELENN

POPULORUM PROGRESSIO

Diorreadur ar pobloù

Troidigezh gant Jil EWAN

PREDER

Kaier 119-120

Mae - Mezheven 1969

K E L C ' H E L E N N
H O N T A D S A N T E L A R F A B
P A O L V I

D'AN BSKIBION, D'AR VEBION, D'AL LEANED
D'AR GRISTENGREDOURION
HA D'AN HOLL DUD A YOUL VAT
DIWAR-BENN

D I O R R E A D U R A R P O B L O U

© 1970, Præder hag an Aozour.

Brezhoneg gant
JIL EWAN

R A K L A V A R

"POPULORUM PROGRESSIO" - "DIORREADUR AR POBLOU", zo unan eus kelc'helennoù talvoudusañ ar Babed war an dachenn gevredigezhel. Gant "RERUM NOVARUM", "PACEM IN TERRIS" ha "MATER ET MAGISTRA", hon eus bremañ digant an Iliz ur geennadurezh unvan, spis ha klok o tiskouez fraezh n'emañ mui an Urzhaz Katolik e Roma "o skoazellañ dre zindan" ar riezoù pinvidik hag ar vondianed enep d'ar broioù paour ha d'ar geizh, mard eo bet biskoazh, a zo kaeroc'h, ouzh henn ober !

Gwelet e vo, en ur lenn an diell, nag a skouer a c'heller kavout amañ ivez o klotañ rik ouzh kudennoù Breizh.

Ret oa neuze treiñ ar gelc'helenn e brezhoneg evit ar gefrederion a zo krog bremañ da studiañ seurt kudennoù war-eeun en o yezh vroadel.

+

+ +

N'eur ket hep gouzout ez eo bet sevenet e labour gant ar Pab Paol VI diwar an dielloù bet savet e galleg gant ur Brezhon, an Tad Lebret. Evit abegoù o tennañ d'ar brezhoneg, yezh yaouank c'hoazh e-keñver troidigezh, hag ouzhpenn dre ma chom re laosk a-wechoù testenn c'hallek ar gelc'helenn, em eus kavet mat harpañ va labour war an destenn latinek kefridiel, embannet ivez gant ar Vatikan. Ne vo nemet gwell-oc'h a se, ne vern penaos, koulz e-keñver stumm, koulz e-keñver danvez.

+

Arabat, avat, klask kavout amañ lennegezh aes. Ne vez ket savet seurt labourioù e brezhoneg evel ma saver romantoù, hogen evit barrekaat ar yezh war vennozioù uhelañ hon amzer. Graet eo va zroidigezh enta evit gorren ar brezhoneg war ar renk gant ar yezhoù-Stad. En tu-hont da se, nep piv bennak en deus studiet ar gela'helenn e galleg pe c'hoazh e latineg a vo kenveho ganin pa lavarin ez eo diaes dont da intent ervat kement pennad anezhi. Speredel-dreist e chom bepred kelennadurezh an Iliz, ha ret e vez d'an nen bezañ arroutet-kenan war ster don ar Speredelezh Kristen evit gwelout sklaer : un dra tost dic'hallus e gwirionez, evit kalz a dud hiziv an deiz !

+
+ +

Kavet e vo neuze e dibenn an oberenn daou rumm notennoù : notennoù ar gela'helenn ha notennoù ar c'hevvezhour.

Notennoù ar c'hevvezhour a denn da gement ger gant ur sterennig war e lerc'h. Pep notenn a ra dave da niverenn ar pennad ma kaver ar ger gant e sterennig.

+
+ +

Allet eo an holl da studiañ hir ha gorrek ar c'heallioù hag an erbedoù a zo bet kinniget en diell-mañ gant ar Pab Paol VI hag eñ hêr war un dro da bPius XII ha da Yann XXIII. Gwelet e vo penaos e c'hall unan eus kaerañ spereded hon amzer unañ memozioù dispac'hel gant urzh, kempouez ha karentez ur gristeniezh rik ha gwirion.

+

Trugarez a lavaran da C'habriel CHEREL, a zo bet da gentañ o tifaostañ an dachenn, hag o reiñ din maladur kentañ e droidigezh e brezhoneg. Setu aze penaos e tleer labourat kenetrezoimp. Bennozh Doue, keneil !

Jil EWAN

UNAN HOLLVEDEL EO HIZIV AR GUDENN GEVREDIGEZH*

DIORREADUR AR POBLOU

1. DIORREADUR AR POBLOU, peurgetket an hini a denn da reoù hag int o klask diankañ diouzh naonegezh, dienez, kleñvedoù hilreuziadek, digelenned; reoù o strivañ da gaout amploc'h lodenn e madoù ar sevenadurezh ha da drevekaat bividikoc'h o ferzhiol-den; reoù stegnet o youlegezh ganto da gerc'hat o barr-kefleunder, emañ an Iliz pervezh-bras oc'h evveshaat outañ. Ha disoc'het ganti Eil Coursened*Vatikan II, sed-hi, diwarbouez ar skiant renevezet he deus prenet eus kemennoù an Aviel, rediet da vont en arempred*an denion, evit o skoazellañ da veizout holl arvezioù seurt kudenn c'hrevus, ha d'o c'hendrec'h-iañ war ar mallus ma'z eo dont da genober, war dreuzoù ur prantad ken tonkus evit Istor an denelezh.

KELENNADUREZH KEVREDIGEZH AR BABED

2. E-skeud o c'hela'helennoù meur : RERUM NOVARUM⁽¹⁾ gant Leon XIII, QUADRAGESIMO ANNO⁽²⁾ gant Pius XI, MATER ET MAGISTRA⁽³⁾ ha PACEM IN TERRIS⁽⁴⁾ gant Yann XXIII, - koulz ha diwarbouez negezioù-skingomz Pius XII⁽⁵⁾ d'an holl riezoù; - ne fazias ket Hon Diaraogerion da zlead o c'harg, sev taurel sklêrijenn an Aviel war grefen kevredigezhel hon oadvezh.

AN DEVOUD PENNAÑ

3. An devoud pennañ, dav d'an holl hiziv emouezañ outañ, eo emañ deuet ar gudenn gevredigezhel da vezañ unan hollvedel. Gant Yann XXIII ez eo bet diogelet fraezh an dra⁽⁶⁾ ha peur-anzavet eo bet gant Sened Vatikan II, goude dezhañ embann ar Vonreizhiad Paskouriel* diwar-benn AN ILLIZ E STERN AR BED KEVADEGEL* (7). Pouezus-bras eo seurt kelennadur, ha mallus en lakaat da dalvezout. Skrijus emañ hiziv ar pobloù naoniek o sevel o mouezh ouzh ar pobloù pinvidik. Setu perak, ha hi fromet gant seurt garmadeg enkredek, emañ an Iliz o pediñ pep hini da glevout karantezus ouzh galvadenn e vreudeur.

O VEAJIN

4. Kent na voe bet fiziet ennomp levierzh an Iliz Katolik e voe sachet hon evezh, da geñver div veaj a rejomp, an eil e Suamerika e 1960, eben en Afrika e 1962, war an diaesterioù mezhus a vez o sammañ hag evel o sparlañ kevandirioù dre ar bed, pegen bras bennak neoazh ar barregezhioù-korf hag ene a vez ganto. Hogen, goude dimp bezañ bet dilennet evit an Diern-velegiezh Veur, ha deuet da vezañ tad d'an holl, hon eus gallet da geñver beajoù e Palestina hag en India, meizout evel gant hon daoulagad hag hon daouarn, ment ar bec'h hag ar boan o devez pobloù diwar hen sevenadurezh da ziwaskañ war o hent davit o diorreadur. C'hoarvezout a reas ganimp zoken, ha Sened Vatikan II o vont en e roud, kacut aotre, diwar darventezioù prientet gant Doue, da vezañ degemeret gant Kuntell ar Riezoù Unanet, hag eno, dirak seurt bodadeg hollbarc'hus, da gemer warnomp ren difennerezh foran ar pobloù paouroc'h.

REIZHDED HA HEZ

5. Enderlik, evit seveniñ c'hoant ar Sened ha diskouez war un dro pegen bras eo emell ar Gador-Santel ouzh* Lazenn*veur ha reizh ar broioù war ziorren, hon eus nevez-desevet e oa dleet Dimp strollañ gant Aozadurioù-Kreiz ar Gurienn ur C'han-gor Pabel, e bal broudañ pobl Doue en he fezh da beuremskiantiñ an dlead a zo warni hiziv an deiz; e doare ma vo lusket ennaog-erezh ar pobloù paouroc'h, harpet ar reizhded kevarzhel etre ar broadoù, ha kinniget skonzell d'ar re bihanoc'h-diorreet, dezho da ren o c'hreskerezh dre o fenn o-unan⁽⁸⁾. Seurt Kengor eo bet kemeret gantañ da anv ha da raklun "Reizhded ha Hez". Ha divar eo dimp e fello d'an holl dud a youl vat kenoberiañ gant hor mibion gatolik hag hor breudeur gristen, evit kas hevelep raklun da benn ... Setu perak emacomp hiziv an deiz uheldoniuz oc'h annouezh an holl da strivañ gant kenurzh, evit ma teuy pep den dre hini da gaout diorreadur kefleun ha, diouzh he zu, kevredigezh an dud d'ober kedunvan* he c'hreskadenn.

L O D E N N G E N T A Ñ

W A R G L A S K

D I O R R E A D U R K E F L E U N

A N D E N

I - E L F E N N O U A R G U D E N N

C'HOANTOU AN DUD

6. Diankañ diouzh an dienez, diogelaat o bevidigezh, o yec'hed, o gourc'hwel; kaout brasoc'h perzh e par ar c'hred-elezhioù*, kuit a nep mac'homerezh ha klet ouzh nep saviad gwastus evit o bonezelezh-den*; kaout brasoc'h deskadurezh, eleze gwerediñ, deskiñ ha kaout amploc'h evit bezout amploc'h: hennezh eo mennad an dud hiziv an deiz, daoust ma'z eo barnet un niver bras anezho da vevañ en ur stad a laka berz war ur c'hoant ken reizh. Diouzh un tu all, e vez ar pobloù nevez-derc'havet en o dishualded vroadel o verzout emaint evel rediet da strollañ kreskerezh emrenel ha bonezel gant frankiz Stadel seurt gant hounnezh, koulz war an dachenn gevarzhel ha war an hini armerzhel, dezho da bourchas kefleunder-deniezh d'o c'henvroiz, evit ma talc'hint al lec'h a zleont kaout e kevredigezh ar Broadoù.

TREVEDIKERIEZH HA TREVAENNOURIEZH*

7. D'akuitañ gant ul labour ken tenn ha ken pouezus, diouer ne ra ket an araezioù hêrezhet digant an tremened, evito da vezañ skort koulskoude. Razas, anzav a ranker n'o deus graet alies ar riezoù trevadanner nemet klask o buz, o galloudegezh hag o c'hlod; ha p'o deus diskroget, o deus lezet an tiriadoù en ur stad armerzhel arvarus, dres diouzh skouer an hini a vez diazezet war ur gounezadur nemetañ, distabil-bras an nevid anezhañ. Petra bennak avat ma ranker anzav an drouk-heuliadoù stag ouzh gwallober un asez trevadennouriezh, e tleer evelato

dougen bri da berzhioù ha da sevenadennoù an drevidion o deus degaset o skiant hag o c'halvezerezh e kalz broezioù tavantek ha lezet madelezhioù war o lerc'h. Pegen eginiek bennak e vez ar framadurioù o deus savet, aze emaint, ha lakaat an digelenned hag ar c'hleñved da gilañ a c'hellont ober, stignañ kehenterezh frouezhus ha gwellaat an doare-bevañ.

DIGEMPOUEZ O KRESKIÑ

8. Henn dezrevellet hag anzavet, e chom anat neozh na spir ket seurt aveadur da daliñ ouzh garvder ar stad armerzhel hiziv an deiz. Rak, laosket en he roll, e tenn ar wikefre da washaat, naren d'esmoliñ an digevatalded a vez o ren etre ar pobloù e-keñver barr-bevañ : emañ ar broioù pinvidik o kreskiñ buan hag ar re baouroc'h o c'houlerec'hiñ war hent o diorren. Bemdez e vez an digemblaoc'h o vrasaat etrezo : darn o kenderc'hañ reñveradoù-bevañs, tra ma van darn all e seurt keñver en dienez krisañ, kas gouzout ouzhpenn ha bez' e c'hallint ezhporzhiañ an nebeud o devo kenderc'het.

UN EMSKIANTADENN LEMMOC'H

9. Etretalud*ez eo bet lifvet holl o'horread ar bed pe dost gant an arvelloù kevarzhel. An trubuilhoù loskus o tiraz renkadoù paour ar broioù war c'hreantelaat zo aet bremañ betek tizhout rannbarzhioù chomet an armerzh eno tirc'hounezal koulz lavaret; ken ez eo deuet ar gouerion zoken hiziv an deiz d'emskiant- iñ "o flanedenn reuzeudik ha gourvestel"(9). Da lakaat ouzhpenn emañ ivez droukskouer an dispazlezhioù, neket hepken e-keñver dasparzh ar madoù, hogen kalz muioe'h c'hoazh e-keñver embregerezh ar veli. Rak, endra ma vez ur voc'hodarc'hiezh*, e lod broioù, o saouriañ frouezh ur sevenadurezh vlizidik, e vez an

dud eno, hag int en dienez hag en digenvez, "o tioueriañ hogos pep galloud da vagañ nep intrudu* pe da sammañ nep kredelezh, pa ne vezont ket entalet an hini eo, hag alies zoken, ouzh amveziadoù* - buhez ha - labour, mezhus evit an hinienn-den(10)".

KENSTOK AR STUZEGEZHIOU

10. Diouzh un tu all, diwar genstok ar stuzegezhioù henvoazel, gant nevezentioù ar stuzegezh c'hreantel, emañ ar frammoù, aet diazas ouzh ezhommoù hon amzer, o tifloskiñ. Ha tra ma soñj d' ar re gozh e oant evel ur stern d'ar vuhez hiniennel ha tiegezhel, unan strizh lies a wech, - arabat avat e wallegañ, - setu m'emañ ar re yaouank o tec'hel dioutañ evel pa ve anezhañ ur wekenn aner o stardañ war o birvidigezh da redek doareoù nevez ar vuhez kevredigezhel. Gwashaet eo c'hoazh an eneberezh etre ar remziadoù gant ur forc'hegenn d'rist : pe, diouzh un tu, mirout an ensavadurioù hag ar c'hredennoù gourdadal, hogen war-bouez dilezel an enraokaat; pe, diouzh an eil tu, briata kalvezderioù ha stuzegezhioù degaset eus an diavaez, war-bouez disteurel neuze an henvoazioù hag, en o c'hevret, fonn ar pinvidigezhioù denel stag outo. Re alies, evit gwir, e welomp ar sintroù divezel, speredel ha kravezel o flakaat, hep na ve bastet navitse da gudenn an enframmadur en ur bed nevez evel hon hini.

KLOZADUR

11. Bras eo an arvar, diwar an trenobi a ren, na ve darn teoget gant mesiazegezh stroñsus teodlidourion, hag int touellerion ha netra ken. Piv ne wel pegen fetis ez eo riskl ar c'hil-verzadegoù feuls, an dispac'hadegoù gourzhabellek* hag ar c'hinviadur ouzh kealreizhiadoù kevervestroniour* ? Sed aze, neuze, gant kement elfenn o vont d'hec'h ober, ar gudenn na c'hell den dianavezout ar c'hrevusted anezhi.

2. AN ILIZ HAG AN DIORREADUR

LABOUR AR GIMINGADED*

12. Hesent ouzh kelennadurezh ha skouer ar C'Hrist, he diazezer, m'edo arouez E gefridi doueel degemenn ar C'Helod Mat d'ar bevion (11), biskoazh n'he deus an Iliz Katolik gwall-eged derc'havadur, zoken denel, ar pobloù ez eo bet-hi o tegas dezho ar feiz kristen. Rak, war un dro gant nevedennoù*, o deus ar gimingaded katolik savet herberc'htioù, klañvdioù, skolioù boutin ha Pennskolioù*. Hag o teskiñ d'ar vroidi an tu da gorvoiñ gwelloc'h o barregezhioù-natur, o deus gwarezet anezho lies a wech ouzh trec'hoant an estren. Moarvat evel denion n'o deus ket oberiet atav en un doare disi, ha, gwech pe wech, ez eus bet gwelet hiniennoù o veskañ hentoù-buhezañ o broad gant gwir negez an Aviel. Daoust da se, n'eo ket hep-ken studiañ an ensavadurioù lec'hel o deus graet, hogen reiñ c'hoazh lank bras dezho; ken e ranker o lakaat war ar renk gant ar wastadourion ambilh, koulz e par an enraog danvezel hag e par an erlusk sevenadurel. E seurt keñver e vo trawalc'h degas amañ da goun skouer an Tad Charles de Foucauld, bet kavet dellezek, en abeg d'e garitez, da vezañ anvet "Breur an Holl", ha bet savet gantañ, evit ar yezh Touaregek, ur geriadur uhelbriz. Hevelep ragarouezherion, hag int entanet gant karantez an Doue Dasprener, amañ dleet Dimp enta dougen bri dezho, koulz ha d'o warlerc'hidi, mennet evelto hiziv an deiz da genderc'hel gant haelled hag emroustet en arempred an dud emaint oc'h avielañ.

AN ILIZ HAG AR BED

13. Hiviziken avat e chom berr pep embregadenn lec'hel ha hiniadel. Emañ stuz ar bed kevadegel oc'h arosod*ma vo graet labour-stroll evit pakañ kevret, en ur gweladur splann, kement arvez armerzhel, kevredigezhel, dioueziantel* ha speredel a zo d'an traoù. Setu perak, o c'houzout evel ma oar diouzh an deniezh, hep na ve ganti an disterañ ratozh d'emellout e dinazelezh* ar riezoù, "ne glask an Iliz nemet un dra : kenderc'hel, dindan lusk ar Spered Frealzer, oberenn ar C'Hrist end-seun, hag eñ deuet er bed evit reiñ testeni d'ar wirionez, evit salviañ ket evit barn, evit gwazañ, nann bezañ gwazet (12)." Evel ma'z eo diazezet evit sevel rouantelezh an neñvoù adal ar bed-mañ, neket avat evit aloubiñ galloudegezh war an douar, emañ-hi diwar-henn o tiogeliñ fraezh ez eus diforc'h etre an div aotrouniezh, he hini ha hini an Dinaz, emveliek ha ma'z eo an eil galloud hag egile, pep unan en e reizh. Hogen, mesket evel ma'z eo-hi gant an Istor, ez eo dleet dezhi "imbroudiñ arouezioù ar prantadoù hag o deveizañ ouzh sklêrijenn an Aviel (14)." Dre ma vez enta o kemer perzh e gwellañ c'hoantoù an denion, ha hi poaniet-bras pa wel na gavont ket o gwalc'h, e fell dezhi bezañ war an dachenn evit o skoazellañ da dizhout o barr-bleuñvadur, war-bouez kinnig dezho pezh a zo diles dezhi : ur gwelva klok war an den hag an denelezh.

GWELADUR KRISTEN AN DIORREN

14. Arabat e ve strishaat an diorreadur, kel anezhañ ganimp, d'ar c'hreskadur armerzhel nemetañ. Rak, evit bezañ gwirion, e rank hennezh bezañ klok, eleze derc'haviñ pep den ha bloc'h an den. Evel ma'z eo het merket en un doare reizh gant un arbennigour eswel : "N'omp ket evit gouzañv e ve dirannet an

armerzhelezh diouzh an deniezh, nag an diorreadur diouzh ar sevenadurioù ma c'hougevan outo*. Ar pep pouezusañ evidomp eo an den, kement den, kement strollemañ-dud a zo, betek an denelezh en he fezh (15)."

GALVIDIGEZH DA GRESKIÑ

15. Ratozh Doue zo gervel pep den da strivañ da greskiñ, rak ur c'halvidigezh eo buhez kement den a zo. Gant e c'hanedigezh e teu da bep unan had a varregezh hag a berzhegezh da drevekaat ha frouezhusaat; ha gant ar barr-bleuñvadur anezhañ, o tont e par an den dre berzh ar gendiladurezh*, an amdro hag ar striv hiniennel, e vez troet pep unan da gerc'hat ar finvez a verk e Grouer dezhañ. Pep hini, bout ha ma'z eus gantañ meizerezh ha rezid en e gerz, a vez kret eus e greskadur hag e silvidigezh. Skoazellet, luziet ivez gwechavez gant e gendilourion hag e hentez, e chom kement den a zo pennañ gweredour e fonnverzh hag e lammverzh, forzh petore levezonioù a vez o c'hoari warnañ; n'eo nemet war-bouez striv e vezerezh hag e youlerezh hepken e vez tu da bep hini d'ober e gresk e park an denegiezh, da gaout brasoc'h talvoudegezh, amploc'h bezoud.

DLEAD AN HINIENN

16. Seurt kreskadur avat n'eo ket unan diuzvarnel an hini eo. Dres evel ma'z eo durc'haet an holl grouadelezh davet he C'hrouer, heñvelseurt ar c'hrouadur speredel emañ dezhañ, diwar e vondoug*, durc'haet e vuhez davet Doue, nep zo Pennwirder ha Peurvad. Kreskadur deniezhel zo neuze kevatal gant sammad hon dleadoù. Kaerañ pezh a zo, hevelep kempoellded e par an natur-den, sevenet ha ma vez un tamm muoc'h bemdez gant striv ha kredegezh an unan, zo gouestlet d'un esweladur

uheloc'h. War-bouez gouevanidigezh ouzh ar C'Hrist Bividikaer, e vez an den oc'h arziraehz* bleuñvadur ur vuhez nevez hag un doare denelouriezh trelankat* o vastañ dezhañ barr-kefleunder : amkanelezh* veur an diorreadur hiniennel eo hounnezh.

DLEAD AR GEDHINIENN

17. Pep den avat zo ezel eus ar Gevredigezh ha dalc'hiat zoken ouzh an denelezh kevav. Galvet eo an holl, ha neket hemañ-hen hepken da gas war rack diorreidigezh leun kevredigezh an dud. Genel, kreskiñ ha mervel a ra pep stuzegezh. Padal, dres evel ma vez an eil tom war-lerc'h eben, gant al lavv, oc'h aloubiñ tamm-ha-tamm an draezhenn, e vez an denelezh ivez o vont war rack gant red an Istor. Ha ni hêred ar remziadoù kent ha buziat* e labour hor c'hempredidi, setu ma'z omp dleour d'an holl. Arabat eo dimp neuze chom diseblant-glez ouzh tonkad hon diskennidi, ma vo ganto, ha ni tremenet, kresket adarre kelc'hiad an tilu* denel. Kehenterezh* e par holl remz an denion, tra wirion anezhañ, n'eo ket hepken degas gantañ gounid evidomp an hini a ra, hogen sammañ dleadoù warnomp ivez.

URZHAZ AN TALVOUDOÙ

18. Tro goll a c'hellje bezañ gant seurt kreskadur hiniennel ha kedhiniennel, mar bije gwallet gwir urzhaz an talvoudoù. Rak, evel ma'z eo c'hoant ar rekiz un dra reizh, al labour diouzh e dizhout zo ivez un dra dleet : "ma ne fell ket d'unan bennak labourat, ra chomo hep debriñ (16)." Nemet e c'hall kerz madoù an douar dougen an nen d'ur c'hoantegezh dic'hoñvor, da gehelidigezh bras-ouzh-bras gourfona, ha betek an droukatiz da vont war c'halloudekaat. Gouest eo krinded* an denion, an tiegezhioù hag ar broadoù da dizhout ar re bacurañ koulz hag ar re binvidikañ, ha da gandren an eil re hag ar re all betek un danvezelouriezh tagus evit ar spered.

FORC'HTALVOUD* AR C'HRESKADUR

19. Nag ar pobloù nag an denion dre hini n'eo ket ar pal diwezhañ evito kacout madoù o vont bemdez war fonnaat. Forc'htalvoud eo pep kreskadur : andiouerus da vab-den, dezhañ d'enraokaat e-keñver denegiezh, setu ma vez strobinellet gantañ ivez, diwar ma tenn dezhañ evel d'an hollvad arabat klask en tu-hont dezhañ. Ken e teu ar c'halonoù da galetaat, ar speredoù da brennañ war bep amgrausted, ha ned eo mui diouzh ar vignon-iez e vez an dud o kejadenniñ, diouzh ar gounid avat an hini eo, hemañ kentañ tizh gantañ lakaat enebiezh ha dizemglev da ren en o mesk. Diwar neuze, klask hepmuiken ar c'haoud armerzh-el a vez ul liver o tizarbenn kreskidigezh pep unan e-keñver denegiezh hag o krennañ war e veurded wirion. Evit ar broadoù koulz hag evit an denion, ez eo ar grinded anatañ stumm an isdiorreadur speredel.

WAR GLASK UN AMDRO-DENIEZH

20. Mar ranker kacout kalvezourion stank-ouzh-stank evit kenderc'hel gant an diorreidigezh, dozion, lemm o meizerezh hag emouestlet, ez eus kalz muioc'h ezhomm anezho c'hoazh evit klask un denelouriezh nevez, barrek da sturiañ tud hon amzer war hent an emadkavout, war-bouez dezho darbenn uheldalvoudoù ar garantez, ar geneilded, ar bedenn hag ar gourarvesterezh*(17). E seurt giz e vo gouest an diorreadur gwirion da dizhout e gefleunder, pa dalv evit pep den koulz hag evit bloc'h an holl kement hag un treizh diwar amdroioù-deniezh disteroc'h davit reoù gwelloc'h.

o

AN UHELBAL DA VUKAÑ OUTAÑ

21. Da vezañ renket gant an amdroioù-deniezh disteroc'h emañ : da gentañ, dienez danvezel an den o tioueriñ betek an izegad-bevañ* ha dienez speredel an den o reuziañ diwar emgerc'hegezh* alfant; pelloc'h ar frammadurioù gwaskus, pe devoudet e vent gant ar gourfred*-perc'hennañ neu-vestroniañ pe c'hoazh gant meskorvoidigezh ar wezhourion neu direizhded ar c'hengreadoù.

Oc'h arwelaat en enep amdroioù-deniezh gwelloc'h emañ : da gentañ, lusk an davanteion da zlogelaat o rekiz, an trec'h war ar gwalennoù kevredigezhel, kresk ar ouiziadurezh hag ar prenañ dioueziant; da c'houde, brasoc'h revil* ouzh bonezel-iez an nesañ, emsturierezh davit skiant ar baourentez* (18), kedstriverezh evit ar mad kevredin, youl-hez; pelloc'h c'hoazh, e par an den, war un dro gant anzavidigezh an uheldalvoudoù, anzavidigezh Doue, nep zo dezho pennabeg ha finvez; hag, enderlik, dreist an holl draoù, ar feiz degemeret evel donezon Doue gant youl vat an den, koulz hag an unded e karantez ar C'hrist, galvet ma'z omp gantañ da gemer perzh, evel mibion, e buhez an Doue Bev, Tad an holl dud.

o

3. AN OBERIEZH. D'EMPREGER

TONKADUR HOLLVEZEL AR MADOU

22. "Ao'hubit an douar ha trec'hit warnañ (19)" : kerkent hag e bajenn gentañ, e vez ar Bibl o kelenn dimp ez eo bet krouet holl draoù ar bed evit an den, da hemañ diwar striv e veizerezh d'o zrevekaat, ha, dre berzh e labour, d'o feurbleuskañ diouzh e gorvo. Mard eo graet an douar avat evit pourchas da bep hini dafar-bevañ koulz ha binviadur-enraokaat, neuze kaout e rekiz diwarnañ zo ivez brient kement den a zo. Gant diwezhar* Goursened Vatikan II, ez eo degaset adarre da goun : "Diouzh ampled an holl dud hag an holl bobloù e rens Doue an douar ha kement a zo warnañ; ma tle neuze madoù ar grouadelezh dont da fonnañ kevatal etre daouarn an holl, hervez lezenn ar reizhded kudennet gant ar garantez (20)." Seurt lezenn emañ diouti kevreizhet kement gwir all a zo, hep disoñjal hini ar berc'hentiezh na hini ar c'henwerzh frank : n'eo ket eta herzel ouzh ar sevenidigezh anezhi e tleont ober, hogen, gwellañ pezh a zo, dougen dorn dezhi; hag un dlead kevarzhel grevus ha loskus eo distreiñ seurt gwirioù war hent o finvezelezh kentañ.

PERC'HENTIEZH

23. "Neb a vo bet pourc'het* emañ war an douar, hag en devo gwelet e vreur en dienez ha premet e galon outañ, penaos e vije karantez Doue o chom en e greiz ? (21)." N'eur ket hep gouzout pegen taer e veze Tadoù an Iliz o verkañ dleadoù ar bourc'heded* e-keñver an davanteion : "Pezh a rez, eme Sant Ambroez, n'eo ket dioueriñ brokus d'an ezhommeg diwar da dra, hogen daskor dezhañ diwar e dra. Rak, pezh a zo roet evel tra

voutin, diouzh ampled an holl, setu te, ganit da unan, oc'h emvrientiñ warnañ. An douar zo d'an holl, neket d'ar binvidion (22)." Anat eo diwar hevelep komzoù, n'eus gant nikun nep gwir ezdivizel* na diharz war berc'hentiezh c'houbarel* ar madoù. Den ebet n'en deus aotre da duañ diouzh e gorvo dezhañ pezh a vez dreistezhomm evitañ, keit ha ma vez ar re all o tioueriñ o fep retañ. Da droc'hañ berr, "hervez kelennadurezh hengounel Tadoù an Iliz hag an deologourion veur, ne c'haller gwech ebet embreger gwir ar berc'hentiezh diwar goust ar mad kevredin." Hag o lakaat e savfe trubuilh "etre gwirioù goubarel diazezet hag ezhommoù pennrenkel ar gevrediniezh*", e vefe d'ar veli gevredik "d'ober diouzh he c'hompezañ gant harp oberius tudennoù ha bodadoù kevarzhiek (23)."

ARVER AN TALVEZADOU

24. Gouramplagañ diberc'hennadur e ra neuze gwechavez ar mad kevredin, pa vez lod domanioù o kaelat ouzh an hevoud-stroll, en abeg dezho bezañ re frank, gwan pe wenn an trevekaat anezho, pe c'hoazh dre ma sachont ezeved war ar boblañs, hag ober gaoù bras ouzh deurioù ar vro. E ser henn diskleriañ fraezh (24), en deus Sened Vatikan II degaset ken splann-all da goun n'emañ ket an talvezadoù hegerz* e diviz froudenn diroll an denion, hag emañ ar sowlwerzh* krinvuzek* da vezañ berzet. Setu perak, evit kel ar geodedourion en o c'herz korvoderioù fonnus o tont dezho diwar anavioù* hag amreal* ar riez, n'haller ket aotren e vijent o treuzdougen lod bras anezho d'an estrenvro, evit o splet goubarel nemetañ, hep na vijent chalet an disterañ tamm gant ar gaoù pouezus a reont e seurt giz ouzh o bro (25).

AR GREANTELAAT

25. Ret ha ma vez evit kreskadur an armerzh ha dere'havadur an den, ez eo ar greantelaat war un dro merk ha lusker an diorren. Rak, o strivañ pennek gant e vez, ha diwar-bouez e labour, e vez an den o tizoleiñ tamm-ha-tamm saveleñnoù an Natur hag o wellaat arver an anvioù snezhi. Setu perak, e skeud reishaat e hentoù-buhezañ, e vez ivez o tiorren en e greiz an doug d'an imbourc'h ha d'an dinoerezh, an asant d'an arvar daspouezet, herder evit embreger, intrudu brokus, skiant ar c'hredelezhioù.

FRANKKEVALAOURIEZH

26. Hevelep diferadoù* nevez war dachenn ar Gevredigezh o deus, siwazh, devoudet ur gealreizhiad o lakaat ar c'horvo da bennlusker an enraog armerzhel, ar c'hevrederezh da bennsaveleñn an armerzh, ar berc'hentiezh digevredik* war ar madoù-kenderc'hañ da wir groñs, hep dezhañ na bonn na dlead kevazhel kevelep. Gant ar seurt frankizouriezh diroll, e oa digor an hent d'ar mac'homerezh, bet Pius XI, Hon Diarnoger, ouzh en dic'hrataat, ha neket hep gwir abeg, evel unan o tisoc'haf war "impalaeriezh* etrevroadel an arc'hant (26)". Biken ne vo tamallet a-walc'h hevelep droukvoazioù, pa vo bet ur wech ouzhpenn degaset uheldonius da soñj emañ an armerzh e gwazonezh an den (27). Mard eo gwir avat emañ re vras niver ar poanioù, an direizhderioù, an arvelloù lazhevreur, hag i droukarnodus bepred, e devoud un asez kevalaouriezh, gaou e vefe koulskoude rebech d'ar greantelaat nemetañ gwaleñnoù kiriek dezho fall-agriezh ar gealreizhiad aet war e seulioù. Gant pep reizhded e tleer, en eskemm, anzav ar prof dibar graet d'an embreger-diorren gant urzhierzh al labour hag enraogerezh ar greantelaat.

AL LABOUR

27. En hevelep doare, petra bennak ma ra reuz gwechavez ur meni gourgred* evit al labour, anat eo neozh ez eo hemañ mennet ha benniget gant Doue. Krouet ha ma'z eo bet diouzh e rizh*, "dleet eo d'an den kenoberiañ gant ar C'hrouer evit kas ar groudelezh da benn hag enlouc'hañ d'e dro war an douar ar siell speredel deuet en e gerz (28)". War-bouez bastañ dezhañ meiz, dic'hmeg ha skiantegezh*, en deus Doue roet an tu d'an den da bengenniñ koulz lavaret an oberenn bet boulc'het gantañ : rak, pe seurt bennak e vez oc'h ober, ken evel arzour pe zornwezhour, ken evel micherour pe gouer, e vez an den, e stumm pe stumm, o krouiñ. Ardamezet e vez gant siell ar gwezhour an danvez amjestr e vez o stouiñ warnañ, tra ma vez o prenañ war un dro kendalc'husted, imbroudegezh hag ijinusted. Kaerañ pezh a zo, pa vez kedvuzhet al labour gant an denion, dre berzh ar goanagoù, ar poanioù, an dere'havegezh* hag al levenezioù boutin stag outañ, e teu ar mennoù da gevredañ, ar speredoù da genhoalañ, ar c'halonoù da gendeuziñ : e gwir, dindan samm al labour an hini eo e vez an dud oc'h anzav o c'hedvreuregezh (29).

AR FORC'HTALVOUD ANEZHAÑ

28. Ha goude d'al labour moarvat bezañ forc'htalvoud, peogwir o kinnig arc'hant, plijadurezh ha galloudegezh e toug darn d'an emgerc'hegezh ha darn all d'an dispac'h, evelkent e vez ivez o tiorren an divezegezh*vicherel, ar skiantkefridi hag ar garantez evit an nesañ. Deuet ha ma'z eo da vezañ gouzzieloc'h hag urzhiokoc'h, gouest eo da lakaat an arvar bonezelezh an den aet da vevel dindanañ; hag evit gwir, nemet ha bez'e vefe meizegezh gantañ, n'hall ket al labour

bezañ denegiezh ennañ. Gant Yann XXIII, Hon Diaraoger hetus an eñvor anezhañ, ez eo bet degaset da soñj pegen difraeüs eo deren ar gwezhour en e vonezelezh, war-bouez ober dezhañ kemer perzh gwirion er gwerederezh kevredin : "Ar c'hevred-adoù-kenderc'hañ ra vezint o wiskañ dremm ur gevredigezh denek, damantus da hentadurezh ar c'hoskor an eil gant egile ha da liesseurtiezh ar gourc'hweloù hag ar c'hargoù (30)." Arvezet ouzh sked ar sklerijenn gristen, ez eo kalz uheloc'h c'hoazh moarvat ar gefridi stag ouzh trevell an denion, tennañ ma ra da grouiñ an dreistbed (31) a chomo war e zarn, ken na ve bet amparet ganimp, holl en ur c'hevret, an Den kefleun degounet gant Sant Paol evel unan "keit ha barr-troc'had" ar C'hrist (32)".

AN OBERENN DIFRAEÜS HE SEVENIN

29. Ret eo difraeñ : re stank eo an dud o c'houzañv, gant an ode bepred o frankaat hag o tisramañ mui-ouzh-mui fonn-araokadur an eil re diouzh kropadur, pe, da lavarout ar wirionez, diouzh argiladur ar re all. Estreget ma rank c'hoazh an oberenn da seveniñ bezañ kaset war rack pervezh ha kompez, kenkas na ve kollet ar c'hempouez, ken ret ha ma'z eo ! Rak, ur primgempenn d'an tirc'hounezerezh* a c'hellfe a-walc'h c'hwitañ war e daol. Dvel ma c'hellfe a-walc'h ur greanteladur difretel* diskogellañ frammadurioù bepred andiouerus, ha degas gantañ reuzioù kevredigezhel argilus e-keñver deniezh.

o

HOALEREZH AN NERZH

30. Moarvat e vez amdroioù ma c'halver diol an neñv war an direizhded anezho. Rak, pa vez poblañsoù en o fezh o tioueriñ betek o fep retañ, hag int ken strizh o dalc'hiadegezh ouzh ar re all, ma chom berzet outo pep emell, pep kredelezh koulz ha pep doare da breñañ dioueziant ha da berzhiadekaat er vuhez kevredigezhel ha dinazel, neuze c'honvat, pegen taer ne sav ket en o c'hreiz an atiz da skarzhañ dre an nerzh an dismegañs a skoer e seurt giz gant o bonezelezh-tud.

DISPAC'HAÑ

31. N'eur ket hep gouzout, - nemet e ve kel moarvat eus mac'homerezh fetis ha padus o tiastenn taolioù grevus gant bonwirioù an hinienn hag o lakaat en argoll kenvad ar vroad, - e vez ar gourzhhell dispac'hel oc'h engehentañ direizhderioù nevez, hag o tevoudañ dismantrou nevez. Rak, daoust pegen gwerc'hel* e ve un droug bennak, ne c'haller ket stourm outañ war briz ur walenn vrasoc'h c'hoazh.

AZVERAT

32. Ra vo fraezh Hon diviz : taliñ gant kalonegezh ouzh saviad an ampoent a zo d'ober hag an direizhderioù o vont gantañ, stourm outo, trec'hiñ warno. Kemmoù bagol an hini eo zo gour-ampleget gant ar c'hreskadur ha reoù nevezouriat* en holl d'an holl. Azveradennoù mallus zo da gas war-rack, hep dale pelloc'h. Ra gemero pep hini perzh frontal enno, dreist-holl ar re deuet dezho barregezh-oberiañ forzh pegement en o c'herz, bennozh d'o deskadurezh, d'o savlec'h ha d'o galloud. Kement ha reiñ skouer vat, ra vezint o tioueriñ diwar o feadra, dres evel m'o

deus graet Breudeur Dimp e parzh an Eskobelezh (33). E seurt giz e vezint o vastañ da hiraezh an dud hag o sentiñ pervezh ouzh ar Spered Glan, pa'z eo "dre nerzh goell an Aviel ez eo bet hag e vez c'hoazh ar youl-vonezelezh o tarzhañ didre'hus e kalon an den (34)."

RAKLUNIAÑ HA STEUÑVEKAAT

33. Nag an embreg* hiniadel, na gwikefre ar c'hevezerezh hep ken all ne spiront evit ma raje berzh an diorren. Arabat heriañ* na ve kresket adarre glad ar binvidion ha galloudegezh ar gedern, tra m'emañ dienez an davanteion o vont war washaat ha yev ar geizh war bonneraat. Setu perak e ranker sevel raklunioù ma vo ganto "kennerzhed, broudet, kenurzhiet, klokaet hag enframmet (38)" oberiezh an hiniadoù hag ar c'horfoù-etre. D'an notrouniezhoù kevredik avat eo da zibab, da verkañ zoken ar palioù da vukañ outo hag an arnezioù diouzh o dirrez; dezho moarvat eo da vroudañ kement nerzh a vo strollet evit seurt kenoberiezh. Hogen, ra vezo damant ganto da lakaat an embregadoù* goubarel hag ar c'horfoù-etre da gemer perzh en ul labour evel henned. E seurt giz e tiwallint rag an argoll a zo stag ouzh pep kengladekadur groñs hag ouzh kement steuñvekadur disreol a vez o tizornañ an hinienn denel diouzh he bonwirioù, dre berzh o nac'herezh-frankiz.

E GOURC'HEMENN AN DEN

34. Rak, kement raklun a zo, savet ha ma vez evit kreskiñ ar c'henderc'h, n'eus dezhañ sol ebet, e penn kont, en diavaez da wazidigezh an hinienn. Graet eo evit krennañ war an dispar-elezhioù, dizarbenn an diforc'herezh, reiñ e frankiz d'an den, da hemañ da vezañ gouest, evel unanweredour* e varr-bevañ, da

wellaat stuz e vevidigezh, da ren e greskerezh divezel ha da vastañ d'e gefleunder speredel. Pa vez kont eus diorren, e lakaer kenkoulz prederi gant an diorreadur kevarzhel ha gant kreskadur an armerzh. Astenn ar binvidigezh voutin ne dalv ket kement hag he dasparzhañ en un doare reizh. Reiñ lusk d'ar c'halvezerezh ne dalv ket kement ha denekaat annezadur an douar. Bez'e rank ar fazioù bet graet gant o ragwezerion* diskouez d'ar re war ziorren kement riskl o deus da ziarbenn e seurt keñver. Arc'hoazh e vefe barrek ar galvezarc'houriezh* da c'hwezhañ reuzioù ken euzhik ha dec'h reoù ar frankizouriezh. Armerzhouriezh ha kalvezouriezh n'eus ganto ster ebet en diavaez d'an den, dleet ma'z eo dezho mont en e c'hourc'hemenn. Hag an den n'eo den e gwirionez, anez dezhañ, warbouez ren war e c'hreadoù ha dezvarm an dalvoudegezh anezho, dont e seurt giz da vezañ gwir weredour e greskadur, hervez an anien bet bastet dezhañ gant e Grouer, ma vez e pep rezid o sammañ kement barregezh ha kement ezhommegezh* anezhi.

35. Bez'e c'haller diogeliñ zoken ez eo sujereet kreskadur an armerzh da gentañ penn ouzh an enraokadur kevredigezhel : kefridi gentañ pep steuñv-diorren zo neuze skolekaat. Rak, ken dizezius eo naonegañ diwar an digelennded ha naonegañ diwar alboued; ha piv bennak e vez droukmaget e spered, e vez un diskoleg anezhañ. Hogen, gouzout lenn ha skrivañ, prenañ deskadurezh war ur vicher bennak, a zo gounit emfiziegezh ha dizoleiñ e vezer barrek da fonnaraokaat kevret gant ar re all. Sed Hon eus lavaret gant an negez hon eus kaset da Gendalc'h Teheran an UNESCO e 1965 : bout ar skolekaat "eswelañ lusker an enframmadur kevredigezhel hag ar pinvidikadur hiniennel

deus graet Breudeur Dimp e parzh an Eskobelezh (33). E seurt giz e vezint o vostañ da hiraehz an dud hag o sentiñ pervezh ouzh ar Spered Glan, pa'z eo "dre nerzh goell an Aviel ez eo bet hag e vez c'hoazh ar youl-vonezelezh o tarzhañ didrec'hus e kalon an den (34)."

RAKLUNIAÑ HA STEUÑVEKAAT

33. Nag an embreg* hiniadel, na gwikefre ar c'hevezerezh hep ken all ne spiront evit ma raje berzh an diorren. Arabat heriañ* na ve kresket adarre glad ar binvidion ha galloudegezh ar gedern, tra m'emañ dienez an davanteion o vont war washaat ha yev ar geizh war bonneraat. Setu perak e ranker sevel raklunioù ma vo ganto "kennerzhed, broudet, kenurzhiet, klokaet hag enframmet (38)" oberiezh an hiniadoù hag ar c'horfoù-etre. D'an aotrouniezhoù kevredik avat eo da zibab, da verkañ zoken ar palioù da vukañ oute hag an arnezioù diouzh o diraez; dezho moarvat eo da vroudañ kement nerzh a vo strollet evit seurt kenoberiezh. Hogen, na vezo damant ganto da lakaat an embregadoù* goubarek hag ar c'horfoù-etre da gemer perzh en ul labour evel henezh. E seurt giz e tiwallint rag an argoll a zo stag ouzh pep kengladekadur groñs hag ouzh kement steuñvekadur disreol a vez o tizornañ an hinienn denel diouzh he bonwirioù, dre berzh o nac'herezh-frankiz.

E GOURC'HEMENN AN DEN

34. Rak, kement raklun a zo, savet ha ma vez evit kreskiñ ar c'henderc'h, n'eus dezhañ sol ebet, e penn kont, en diavaez da wazidigezh an hinienn. Graet eo evit krennañ war an dispar-elezhioù, dizarbenn an diforc'herezh, reiñ e frankiz d'an den, da hemañ da vezañ gouest, evel unanweredour* e varr-bevañ, da

wellaat stuz e vevidigezh, da ren e greskerezh divezel ha da vostañ d'e gefleunder speredel. Pa vez kont eus diorren, e lakaer kenkoulz prederi gant an diorreadur kevarzhel ha gant kreskadur an armerzh. Astenn ar binvidigezh voutin ne dalv ket kement hag he dasparzhañ en un doare reizh. Reiñ lusk d'ar c'halvezerezh ne dalv ket kement ha denekaet annezadur an douar. Bez'e rank ar fazioù bet graet gant o ragwezerion* diskouez d'ar re war ziorren kement riskl o deus da ziarbenn e seurt keñver. Arc'hoazh e vefe barrek ar galvezarc'houriezh* da c'hwezhañ reuzioù ken euzhik ha dec'h reoù ar frankizouriezh. Armerzhouriezh ha kalvezouriezh n'eus ganto ster ebet en diavaez d'an den, dleet ma'z eo dezho mont en e c'hourc'hemenn. Hag an den n'eo den e gwirionez, anez dezhañ, warbouez ren war e c'hreadoù ha dezvarn an dalvoudegezh anezho, dont e seurt giz da vezañ gwir weredour e greskadur, hervez an anien bet bastet dezhañ gant e Grouer, ma vez e pep rezid o sammañ kement barregezh ha kement ezhommegezh* anezhi.

35. Bez'e c'haller diogeliñ zoken ez eo sujereet kreskadur an armerzh da gentañ penn ouzh an enraokadur kevredigezhel : kefridi gentañ pep steuñv-diorren zo neuze skolekaat. Rak, ken dizerius eo naonegañ diwar an digelemded ha naonegañ diwar olboued; ha piv bennak e vez droukmaget e spered, e vez un diskoleg anezhañ. Hogen, gouzout lenn ha skrivañ, prenañ deskadurezh war ur vicher bennak, a zo gounit emfiziegezh ha dizoleiñ e vezer barrek da fonnaraokaat kevret gant ar re all. Sed Hon eus lavaret gant an negez hon eus kaset da Gendalc'h Teheran an UNESCO e 1965 : bout ar skolekaat "eswelañ lusker an enframmadur kevredigezhel hag ar pinvidikadur hiniennel

e par an den, estreget ma vez benveg uhelbriz an enraog ar-merzhel hag an diorren e par ar gevredigezh hec'h-unan.(36)"
Boz eo Dimp neuze gwelout al labour mat, bet embregadoù prevez, pennadurezhioù kevredik hag aozadurioù etrevroadel o kas da benn e seurt keñver : difraosterion an diorren ez int bet, o varrekaat an denion d'akuitañ gantañ dre o fenn o-unan.

AN TIEGEZH

36. An den avat n'eus dezhañ hevelebiezh nemet en e vetoù kevredigezhel, lec'h ma vez an tiegezh emichañs o c'hoari ur roll pennrenkel. Gourfredel eo bet hemañ marteze, seul wech, hervez ar prantadoù hag al lec'hiennoù, ma'z eo bet renet di-war goust gwirioù bonel an hinienn. Evelato, hen sternioù kevredigezhel ar broioù war ziorren, petra bennak ma vezont alies re reut ha gwall-stuziet, ez eus ezhomm anezho o'hoazh evit ur pennad, daoust ma rank o levezon dic'hoñvor mont tamm-ha-tamm war laoskaat. An tiegezh avat, hag eñ naturel, unwregel ha divrall, dres hervez an doare bet mennet evitañ gant Doue (37), ha santelaet evel ma'z eo bet gant ar gristeniezh, zo da vezañ miret evel "tachen-emgav remziadoù stank, ma vez an eil o tegas e skoazell d'an all evit klokaat ar furnez ha kempoellañ brientoù an hinienn gant ampegadoù all ar vuhez kevredigezhel (38)".

POPLANSEGEZH

37. Gwir eo e teu re alies kreskerezh herrek ar boblañs, gant ar skoilhoù stag outañ, da luziañ muioc'h c'hoazh kudenn-où an diorreadur : bez'e vez tols ar boblañs o kreskiñ buanoc'h eget an anvioù hegerz, ken e seblanter bezañ goustraedet*.

Techet-bras e vezer neuze da weskenañ kresk ar boblañs diwar-bouez arbennoù* groñs. Razas, e stern o bannveli*, emañ gant ar pennadurezhioù kevredik ar galloud hag an dlead d'ober emell, dre skignañ stlennadur arbennik ha kemer disentezioù kevazaset, gant ma vezint heglot ouzh erverkadurioù al lezenn divezel ha damantus da frankiz reizh ar parad*. Bonezelezh an den n'eus ket anezhi hep ar gwir anestrekadus* da zimeziñ ha da hiliañ*. D'ar gerent, e penn kont, eo da gemer warno merkañ, diwar skiant fraezh, niver ar vugale o devo, war-bouez dezho sammañ pep kredelezh dirak Doue, dirazo moarvat o-unan, dirak ar vugale o deus krouet endeo, ha dirak ar gevrediniezh e talc'hiadekaont outi, oc'h ober diouzh erverkadurezh o c'haouded, hemañ sklêrijennet gant Lezenn Doue rikdevezet, hag ar fiziañs Ennañ ouzh en harpañ (39).

AOZADURIOU MICHEREL

38. An den, ha dezhañ e diegezh da greizenn-vuhez, a vez skoazellet lies a wech war labour an diorren gant aozadurioù micherel. Ha peogwir ez int graet evit ober war dro deurioù an dud ezel dezho, ez eo bras o c'hredegezh e-keñver an trevell-diorren o deus galloud ha karg da seveniñ. Dre berzh ar stlennadur a vez roet hag ar stummadur a vez kinniget ganto, e c'hellont ober kalz evit lakaat an holl d'emskiantañ ar c'hevrad hag an dlead-où o tont dre benn hemañ war bep hini.

GWIRABEGELEZH AL LIESELEZH

39. Pep oberiezh kevredigezhel zo liammet ouzh ur gelennadurezh bennak. Ar c'hristen avat ne c'hall ket asantiñ d'an hini a zo diazezet war gealreizhiad an danvezelouriezh hag an dizoueriezh, digernezh ha ma'z eo, ken evit dure'hadur kravezel ar

vuhez ouzh he finvez diwezhañ, ken evit ar rezid hag ar vonez-
elezh denel. Koulskoude, keit ha ma chom hevelep talvoudoù
klet ouzh pep argoll, e ranker anzav gwirabegelezh un doare
lieselezh e par an aozadurioù micherel ha c'hweluniadel hag,
en ur stumm bennak, ar spletusted anezhi pa vez gwarezet ar
frankiz ha broudet ar c'hendamouez ganti. Setu perak, a wir
galon, e tougomp gouvri d'ar re a vez o poñial diembarboell
en arempred o breudeur.

DERC'HAVIÑ PEP SEVENADUR

40. En tu-hont d'an aozadurioù micherel, emañ ivez an ensav-
adurioù sevenadurel oc'h ober bec'h, ha kenkoulz labour e
grad ouzh* an diorren. Gouez d'ar Goursened pa vez evel-henn
prederius o tiogeliñ : "Argollus e ve dazoned ar bed, paneve
da dud furoc'h sevel hiziv war an dachenn." Hag adarre :
"Estreget ma'z eo heverk niver ar broadoù, moarvat paouroc'h
e par ar madoù danvezel, pinvidikoc'h koulskoude gant o furnez,
hag a vefe gouest da ginnig skoazell vagol d'ar re all e seurt
keñver (40)." Paour pe binvidik, he deus pep bro he sevenadur
o tont dezhi digant he gourdadoù, sev ar bonaozadurioù ret
evit bevañ war an douar, hag ivez eztaoladoù meur buhez ar
spered war an dachenn arzel, kefredel ha kravezel. Pa vez gant
ar re-mañ gwir dalvoudegezh denel, e vefe fazi bras o gwall-
egañ e grad ouzh ar re-hont. Ha mar degouezhje d'ur bobl bennak
kesentif* gant se, ne raje ken nemet aberzhiñ war acter he
beved nemetañ he gwir abegoù da vevañ. D'ar pobloù ivez e vez
kentel ar C'hrist oc'h ober dave : "Pe laz d'an den gounit
an hollved, mar deu da goll e vuhez?" (41)."

HOALBREZH AN DANVEZELOURIEZH

41. Biken ne vo taolet evezh a-walc'h gant ar pobloù paour
ouzh un droukatiz evel henezh o tont dezho dre berzh hevoud
ar pobloù pinvidik. Rak, diwar anadurezh an dere dreist stag
ouzh o stuzegezh kalvezouriel hag ouzh o sevenadur, e vez ar
re-mañ oc'h arwelañ betek re patrom un oberiadegezh troet
pergen d'ar mestronidigezh ar fonnverzh danvezel. Neket e vefe
berzet oberiadegezh ar spered gant hemañ, pell ac'hano, peogwir
"seul vui ma vez distag dicouzh an traoù*", e c'hall spered an
den sevel aassoc'h a se gant azeulerezh ar C'hrouer ha gant an
arvesterezh Outañ (42)". Padal, ar stuzegezh arnevez, ket en
abeg d'hec'h anien, hogen dre ma'z eo landrammet betek re gant
ar glennadurioù*, zo gouest lies a wech d'ampalvarziñ kement
darempred gant Doue (43). Setu perak emañ d'ar pobloù war
ziorren gouzout ober o mennoz evit pezh a ginniger dezho :
tamallent ha dizarbennent ar madoù touellus a vez o tidalvoud-
ekaat uhelbatrom ar vuhez denel; darbennent avat an talvoudoù
yac'h ha madoberus, evit o diorren war un dro gant ar re gou-
barel dezho, pep hini hervez he speredegezh diles.

WAR GLASK DENELOURIEZH KEFLEUN
KLOZADUR

42. Denelouriezh kefleun an hini eo a zo d'erluskañ (44).
Da lavarout eo petra, ma n'eo ket diorreadur klok an den en e
bezh, ha hini an denion holl gwitibunan ? Un denelouriezh kloz,
prennet war dalvoudoù ar spered ha war Zoue, nep zo dezho penn-
abeg, a c'hellfe a-walc'h bezañ gwelloc'h da welout. Peogwir ez
eo barrek an den da gempenn ar bed hep Doue; padal "hep Doue,
ne vije ket tu dezhañ d'e gempenn, nemet ha diwar-bouez mekaat
an den enderlik e vije. Denelouriezh diskarzhidik* zo denel-

ouriezh andenek (45)." N'eus enta denelouriezh wirion ebet,
estreget an hini a vez troet ouzh ar Feurvoud, ha ni diwar-henn
oc'h anzav ez omp galvet evit ur gefridi ma vezomp ganti o
veizañ gwir ster ar vuhez denel. Pell neuze diouzh bezañ reizh-
enn diwezhel an talvoudoù*, ne vez an den o tiraz e gefleun-
der nemet war-bouez emzrestelaat. Hervez ar bomm o tont ken
reizh gant Blaise Pascal : "An den zo keverdreist* d'an den
(46)."

) o (

E I L I O D E N N

W A R G L A S K

D I O R R E A D U R A N D E N E L E Z H

D I W A R - B O U E Z K E D G R E D *

DIGORADUR

43. Diorreidigezh-klok an den emañ dezhi mont kevret gant hini an denelezh, diwar-bouez kedgred. Henn lavaret Hon eus e Bombay: "Ret eo d'an den kejañ ouzh an den, d'ar broadoù kejañ ouzh ar broadoù, evel kenetrezo breudeur ha c'hoarezed, evel bugale da Zoue. Gant kefradiezh ha kouvran tiezh*, gant kedunvaniezh nevet heñvelseurt, e tleomp ivez kregiñ da genober, en ur c'hevret, evit prientiñ kendazoned an denelezh (47)." Setu perak Hon eus kinniget e ve klasket doareoù pleustrek ha berzhus evit kenurzhiañ ha kenoberiañ, evit kevredinaat an anvioù hegerz hag e seurt giz lakaat gwir gedunvaniezh da ren etre an holl vroadoù.

KEDVREUREGEZH AR POBLOU

44. Hevelep dlead e vez arnezet* gantañ da gentañ penn ar re bourc'hetañ, diazezet ha ma'z eo war ar gedvreuragezh denek ha trabedel, teirneuziet an arwel anezhi : kentañ pred, an endalc'h d'ar c'hedgred, war-bouez d'ar broioù pinvidik degas ar skoazell emañ dezho reiñ d'ar pobloù war ziorren; pelloc'h, an endalc'h d'ar reizhded kevarzhel, war-bouez parraat ouzh nammed an hent-adurezh kenwerzhel etre pobloù krefiv ha pobloù gwan; hag enderlik, an endalc'h d'ar gedgarantez hollvedel, war-bouez dere'haviv denekoc'h bed evit an holl, ma vo da bep hini reiñ ha degemer, hep na ve fonnverzh darn o sparlañ kreskadur ar re all. Ur gudenn c'hrevus, mar bez, p'emañ diouti dazoned ar sevenadurezh war an douar.

STOURM OUZH AN NAONEGEZH

45. "Mar bez ur breur pe ur c'hoar deoc'h en noazh, eme Sant Jakez, mar dioueront o boued pemdezies, hag unan ac'hanoc'h o lavarout : 'kit e peoc'h, grit un dommadenn ha debrit ho kwalc'h,' hep na rofec'h dezho pezh o deus ezhomm evit o c'horf, pe c'hounid a vo (48) ?" An deiz gant hiziv, n'eus den hiviziken hep gouzout e kaver dre gevandirioù en o fezh engroezioù gwazed ha merc'hed garwasket gant an naonegezh, engroezioù bugale, hag i ken droukmaget, ma vez un niver bras en o mesk o vervel bihanik-tener, tra ma vez kalz reoù all arvaret kresk o c'horf hag o bred, ha rannbarzhioù en o fezh barnet, adal neuze, da reuziañ diwar an duañ dinerzhoni.

HIZIV

46. Mouezhioù rec'hek o deus garmet endeo da c'houleñn skoaz-ell. Ha selacuet eo bet gant birvidigezh galv Hon Diaraoger, hetus an eñver anezhañ, Yann XXIII (49). En renevezet Hon eus, Ni Hon-Unan, diwar-bouez un negez da geñver Gouelioù Nedeleg, e 1963 (50), hag ur wech all c'hoazh, e 1966, da geñver un emelladenn e grad ouzh India (51). Stourmadeg ar Gourzhnaon zo bet maget-brokus dindan lusk an Aozadur etrevroadel evit ar vevidigezh hag an tirc'hounezerezh (F.A.O.), bet o vourc'hañ an erv, hag ar Gador-Santel o tougen dorn. E pep lec'h emañ Hon Ensavadur "CARITAS INTERNATIONALIS" gant e labour, ha kalz Katoliged a vez gwelet, war atiz Breudeur Dimp e parzh an Eskobelezh, o kinnig diemzant o foan hag o nerzh en arempred an ezhommeion; ken e teu tamm-ha-tamm da vrasaat niver an dud aet d'ober kelc'hiad an hentez anezho, dre berzh ar skoazell o deus dezho degaset.

47. Hogen n'eur ket evit tremen gant se, na gant postadurioù goubarel ha kevredik, na kennebeut gant roadoù ha kellidoadurioù war gred. Ar gudenn ned eo ket bezañ trec'h war an naonegezh hepmuiken, na zoken lakaat ar baourentez da gilañ. Rak ar stourm ouzh an dienez n'eo ket a-walc'h, daoust pegen mallus bennak ha ret ma'z eo. Ar gudenn zo diazezañ ur Gevredigezh-tud ma c'hello ganti nep piv bennak, hep forc'h e-keñver gouenn, kravez pe vroadelezh, ren ur vuhez-den kefleun, distrob diouzh kement kaezhadur* o tont dezhañ dre benn an dud, hag ivez dre benn un Natur skort an doñvadur anezhi; ur Gevredigezh enta, ma ne vo ket ar ger frankiz ganti unan goull; ken na c'hello Lazar gaezh konzezañ ouzh an hevelep taol gant ar pinvidig (52). Hemañ e vo se moarvat gouleñn kalz haelled digantañ, kalz em-berzh, ha striverzh diastal. Da bep hini neuze d'imbroudiñ e greizon, p'emañ hemañ o komz evel ur yezh nevez ouzh hon oadvezh. Daoust ha darev eo pep unan da skorañ diwar e c'hlad an oberoù hag ar c'himingadezioù terket evit frealziñ an davanteion ? Da dalañ brasoc'h kemedoù*, d'ar veli gevredik diwar se da gadarnaat he strivedoù, diouzh amplant an diorre-adur ? Da brenañ keroc'h an enbroadurioù, ma vo reishoc'h gopret ar c'henderc'her ? Da vont betek divroañ zoken, mar bez ret, - ha gant bezañ yaouank d'henn ober, - evit dougen dorn d'ar broioù nevez o sevel ?

AN ENDALC'H D'AR GEDGREDEGEZH*

48. Heñvelseurt e vez e par ar pobloù hag e par an hinienoù an endalc'h d'ar gedgredegezh : "Ar broioù diorreet emañ warno an dlead hollec'hrevus da skorañ ar pobloù war ziorren (53)." Ret eo lakaat seurt kelennadur da dalvezout. Rak mard eo reizh

e tegouezhfe d'ur vro bennak ar gounid kentañ diwar an don-
ezonoù graet deshi gant an Doue Peurvastour*, koulz ha diwar
frouezh he labour, hini koulskoude ne c'hall mennadiñ tuiñ
he madoù diouzh he c'horvo-hi nemetken. Pep poblad emañ
dezhi kenderc'hañ muioù'h ha gwelloc'h koulz evit bastañ
gwir vonezelezh denel da gement dalc'hiadeg* anezhi, koulz
evit erluskañ, diwar-bouez kedgredegezh, diorreidigezh an
denelezh kevan. Ha gant ezeved ar broioù isdiorreet o vont
war washant, emañ diouzh reolenn, evit kement bro diorreet
a zo, gouestlañ lod eus he c'henderc'h da zic'hoantañ ar re-
hont; diouzh reolenn eviti henveldra stummañ desavourion,
ijincourion ha gouizieion, dezho, gant o skiant hag o gouest-
oni, da glevout outo.

AN DREISTEZHOMM

49. Un dra zo ivez da vezañ bepred adlavaret : pezh a vez
dreistezhomm d'ar broioù pinvidik a rank spletif d'ar broioù
paour. Lezenn ar skoazell, dedalvezadus gwechall d'an tostañ
hentez nemetañ, emañ dleet e ve'arazet ganti hiziv an deiz
holl davanteion ar bed. Ar re binvidik a vo da gentañ, forzh
penaos, oc'h ober o gounidigezh diwar se. Koulskoude, dre
soul* amzeriñ gant o c'hrezni, sachañ warno barnedigezh Doue
ne rafent ken, koulz hag ernez ar geizh, andiawelus he di-
soc'hoù ganti. Hag o chom tamolodet en o c'hrinvuzegezh, e
c'hallfe a-walc'h stuzegezhioù, savet hiziv en o barr-bleuñv-
adur, mekaat an uhelañ talvoudoù deuet en o c'herz, sberzhif
ma rafent war aoter o c'hoant da gaout amploc'h o youl da
vezout amploc'h. Ma c'hallfed neuze gwiriañ warno hañvaladenn
an den pinvidik, medet gentañ trevadoù ken puilh ma ne ouie
dare pelec'h o dastum : "Nemet e lavaras Doue dezhañ : diskiant
ac'hanout, fenezh dres e vo goulennet da ene diganit (54)."

RAKLUNIAÑ

50. Seurt strivoù neozh, dezho d'ober berzh leun, n'emaint
ket da vezañ renet war skign na diouzh o zu, na kennebeut
enebet an eil re ouzh ar re all diwar abegoù o tennañ d'al
levezon pe d'ar c'halloudegezh. Emañ stuz an ampoent oc'h
arosed ma vo savet raktunioù kendoniet*. Hag, evit gwir,
spletusoc'h e vez atav kaout ur raktun, ha gwelloc'h ivez,
eget ur siseurt skoazell dargouezhel digant unan bennak,
hervez e did. Evel meneget uheloc'h Ganimp, embreger studi-
ennoù pervezh a zo d'ober, markañ palioù, resisaat an araez-
ioù, kenstrollañ ar strivadoù, diouzh gallout bastañ d'an
ezhomoù kevadegel ha d'an ampegadoùwar wel. Hogen, kaerañ
pezh a zo, gant pep raktun e tizher kalz larkoc'h eget pep
diabellwelad e par an enraog armerzhel ha kevarzhel : reiñ
ster a reer ha talvoudegezh d'an oberenn a vez da seveniñ ha
kadarnaat bonezelezh an den, endra ma prienter terkadur ar
bed.

AR YALC'H HOLLVEDEL

51. Hogen, mont pelloc'h c'hoazh a zo d'ober. Da geñver Ken-
dalc'h an Euc'haristiezh e Fombay, Hon eus goulennet e vefe
savet ur Yalc'h Hollvedel vras, bouetet evit un darn diwar
an dispignoù milourel, e sell da barraat ouzh an dishêresh
vrasañ (55). Neuze, pezh a dalvez evit stourm raktal ouzh an
dienez, a dalvez kenkoulz-all evit an diorren. En diavaez
d'ar c'henober etrevroadel, gant ur yalc'h voutin evel arouez
hag evel benveg dezhañ war un dro, n'eus razas seurt all ebet
a gement a c'hellfe reiñ gwelloc'h an tu da c'hounit an tres'h
war an enebiezhoù didalvez ha d'atizañ kendivizezh frouezhus
ha didrubuilh etre an holl bobloù.

AR SPLET ANEZHI

52. N'eus mar ebet e tleer kendero'hel gant arver an emglevioù divgevrannek pe lieskevrannek : rak, en o skeud e teu hentadurezh yac'hus ar geneiliez, maget war sol ar gevatalded reizhoniell ha dinazel, da gemer lec'h an droukdarempredoù diwanet gant hualegezh* ha gourvenn an oadvezh trevadennel. Seurt emglevioù avat, mar bijent kenstrollet e stern ur raklun bedel evit ar c'henoberiañ, ne vije mui diskred ebet warno. Ha fizidikoc'h en o c'heñver e vije kement hini a denn gounid anezho. Dinec'husoc'h e vijed ivez, engortoz ma vezer bepred na vije kement skoazelladenn gellidel pe galvezel o tirligini* lod estaoladoù e par ar pezh a reer anezhañ neveztrevadennouriez, dezhi da bal klask, e stumm gwaskerezh dinazel ha mac'homerezh armerzhel, gwareziñ pe savadenniñ gourheizh* ur voc'hodarc'hiezh.

AN DIFRAEÛSTED ANEZHI

53. Evit ac'hano, piv ne wel ket pegen aezet e vefe, dre berzh ur seurt Yalc'h, krennañ war dispignachoù 'zo, maget n'int ken pe gant ar spont pe gant al loro'h ? Pa vez kement a bobloù o naonegañ, kement a diegezhioù o tavantegiñ, kement a dud o reuziañ diwar o digelennded, ha ken bras ar goulenn war skolioù, klafividoù, annezadurioù gwerzh o anv*, e vez neuze kement foranerezh kevredik pe zigevredik, kement dispign stroñsus, pe vroadel pe hiniadel e vent, hag ivez kement bellaveadeg* vrevus oc'h amparañ droukskouer anc'houzañvus*. Nac'hañ warni zo neuze un dlead hollc'hrevus Evidomp. Hag ar re giriek, salv ma selaoufent Ouzhimp kent na vo re zivezhat.

AR C'HEVRAOU DA DERKAÑ

54. Setu perak, hervez an hetoù douget ganimp en ur sevel Hor c'hentañ Lizheroù-Kalc'h "ECCLESIAM SUAM" (56), e rank an holl bobloù dont etrezo da gevrauat*. Diwar-bouez seurt kendivizerezh etre lod o kinnig anvioù ha lod all oc'h ober o mad anezho, e vo tu da jediñ ment ar skoazell a vo da bourchas, naren hervez largentez ha pinvidigezh ar re gentañ hep-muiken, hogen, hervez ezhommoù gwirion ha barregezh-trevekaat ar re all ivez. Neuze ne vo ken tamm riskl ebet e vefe sammet ar broioù war ziorren gant an dle, ma vez ar pep brasañ eus o gounid o vont da vastañ dezhañ. Gallet e vo terkañ kampi ha taluad ar prestoù en un doare dereat evit pep kevran, dre lakaat ar skodennadurioù gradus*, ar prestoù digampi pe stumm-gampi* ha taluad an dastalerezh da gemblac'hañ*. Tu a vo ivez d'ober diouzh ma vo gwarantet ar gelliderion evit a sell an arver a vo graet eus o c'hredoù hervez divizoù ar steuñv ha hervez dereadelezh an ampled a vo tennet anezhañ, rak arabat e vefe grandekaat* nag al-leziregezh nag an arvevadegezh*. Hag evit kel ar broioù buziat, e c'hallint gourarc'hini* na vo nikun oc'h emellout en o dinazelerezh nag o tegas trubuilh en o frammadurezh kevredigezhel. Rak, hag int emveliek evel Stadoù, emañ en o c'herz embreger o c'hefridioù dre o fenn o-unan, diferañ war o dinazelerezh ha klask, e pep rezid, an doare-kevredigezh a vo gwell ganto. Kenobererezh mennet, kemperzhiataerezh* berzhus eo a zo da derkañ, gant bonezelezh kevatal da bep hini, evit dont da sevel ur bed gwelloc'h e-keñver denegiezh.

AN EZHOMMELEFZH ANEZHAÑ

55. Hevelep kefridi a seblantfe a-walc'h koulskoude bezañ dreist pep galloud e lod rannbarzhioù, lec'h ma vez trechal ar bara pemdeziek o vac'homañ buhez kevan tiegezhenoù hag i divarrek d'empentiñ ul labour bennak a brenfe dezho drantoc'h dazoned. Padal, seurt gwazed ha maouezed eo a zo da skorañ ha da gendrec'hiñ, ma stagint bagol int o-unan gant o labour-diorren, dezho da zont tamm-ha-tamm da c'houzout ar stek d'en kas da benn. Emic'hañs n'oufe kenoberiadeg seurt gant hounnezh mont en he roud, anez striveresh kedunvan, kendalc'hek ha kalonek. Ra vo fraezh neuze da bep unan, emañ diwar seurt pouez buhez ar pobloù paour, senadurezh enriazel* ar broioù war ziorren ha, gwellañ pezh a zo, senadurezh ar bed ivez.

II - R E I Z H D E D

E PAR AN DAREMPREDOU-KENWERZH

56. Neoazh, evit kel ar strivademoù bras a vez diwasket e grad ouzh ar broioù war ziorren, dezho da vezañ divec'hiet war an dachenn gellidel ha kalvezel, touellus a bep hent hag aner ne vijent ken, mar bije ar weredusted anezho dinerzh et muñ pe vui gant gwikefre an darempredoù a vez o ren, e-keñver kenwerzh, etre ar pobloù pinvidik hag ar pobloù didra. Rak, bruzunet e vije fiziegezh ar re-mañ, mar savje dezho meiz* e vijed gant un dorn o skrapañ diganto pezh a vijed bet gant an dorn all o profañ dezho.

o

DIGEMPARZH O KRESKIÑ

57. Hag evit gwir, endra ma'z eo pleuskadoù dreist-holl e vez ar riezoù barrgreantelet o tiavaeziañ, ar broioù krakarmerzh-elet, int moarvat, n'o devez netra da werzhañ nemet frouezh o douaroù ha danvezioù krai. Gant enraog ar c'halvezerezh e weler neuze priz ar re gentañ o vont buan war grec'h, dezho gwerzh dereat war an nevidva. Fell avat diouzh kanañ* diwar an un souldalvezadur* argreskus, an danvezioù krai, int-i, pourchaset ma vezont gant broioù isdiorreet, a vez atav o reuziñ ouzh kemmoù-priz dic'hoñvor ha trumm. Da heul, e sav diaesterioù bras evit ar broioù skarsgreantelet, peogwir, panevet o diavaeziadurioù, n'o dije seurt all ebet e c'hall-jent kontañ warañ, dezho da virout o armerzh en e blom ha da gas o steuñv-diorren da benn. Setu perak e chom paour ar broioù paour, ar re binvidik o vont bepred war binvidikaat.

DISTREMEN AR FRANKIZOURIEZH

58. Anat eo enta n'eus tu ebet mui da ren war an darempredoù etrevroadel diwar-bouez reolenñ ar frankeskemm nemeti. Moarvat e talc'h houmañ d'ober berzh keit ha ma chom damgevatal ar gevranidi* e-keñver damani : broudañ zoken an enraokaat e ra-hi neuze ha gopraat kement striv evel ma'z eo dleet. Setu perak e vez graet lezenn reizhdedus* anezhi gant ar broioù diorreet o greanteladur. Dishañval ar gont avat pa vez re vras digevatalded eus an eil bro d'eben, rak bez'e c'hall neuze ar prizioù a vez tonket war an nevidva "hervez ar frankiz" degas disoc'hoù direizh ganto war o lerc'h. Ret henn anzav : pezh a zo bonabeget* amañ eo pennstur ar frankizouriezh evel sol d'an eskemmoù kenwerzhel.

REIZHDED AR C'HEVRATOÙ ETRE AR POBLOU

59. Derc'hel e grog e ra bepred kelemmadur Hon Diaraoger, di-
 varvel an eñvor anezhañ, Leon XIII, dres evel m'en kaver en
 e gela'helenn "RERUM NOVARUM" : hervezañ, kesent* ar c'hevrannoù,
 mar bez digevatalded etrezo betek re, ne spir ket evit ma vefe
 gwarezet ar reizhded gant ar gevrat, hag e chom sujereet neuze
 reizhenn ar c'hesent rez ouzh diferadurezh* ar Gwir Naturel
 (57). Pezh a zo gwir enta gant hevelep kelemmadur diwar-benn
 reizhded ar gopr evit pep micherour, zo ken gwir-all ivez di-
 war-benn ar c'hevratoù a vez tonket etre ar pobloù : moarvat
 ne c'hall mui reizhiad an eskemmañ bezañ diazezet war lezenn
 ar c'hevezerezh nemeti, dre ma vez treusren* armerzhel o sevel
 re alies diwarni. Neuze frankiz an eskemmerezh n'eus ganti
 tamm gwirioni* ebet, anez dezhi chom hesent ouzh diferadurezh
 ar reizhded kevarzhel.

AN ARBENNOU DA GEMER

60. Evit ac'hano, meizet eo bet ervat an dra gant ar broioù
 diorreet int o-unan, strivañ ma reont, war-bouez arbennoù
 kevazaset ouzh o armerzh goubarel da virout etrezo bepred ur
 c'hempouez a vez risklet mui pe vui da vezañ kollet gant ur
 c'hevezerezh laosket en e roll. Bez' e vezont alies, da skouer,
 o tiwall o zirc'hounezerezh diwar goust gennadoù feuzikoc'h*
 e parzh an armerzh. En un doare heñvel ivez, evit ma rafe
 berzh an darempredoù-kenwerzh a vagont kenetrezo, peurgetket
 en amgant un nevidva kevredin bennak, e klaskont an dro, war-
 bouez o leviadurezh kellidel, kemedel ha kevarzhel, da reiñ
 o c'heitlank* da c'hreanterezhioù kevezat*, hag int digeit-
 lank e-keñver fonnverzh.

KENGREADOU ETREVROADEL

61. Arabat kemer seul benn seul gont amañ da reolenn. Pezh
 a dalv e par an armerzh broadel, pezh a vez diouzh reol etre
 broioù diorreet, a vez heñvelseurt ivez e par an darempredoù-
 kenwerzh etre broioù pinvidik ha broioù didra. Kentoc'h eget
 lakaat berz war an nevid-kevezañ, ez eo gwell en mirout e
 diabarzh bevennoù ma c'hello bennoz dezho chom reizh ha di-
 vezek, ha diwar-henn denek ivez. Re vras e vez an diforc'h
 etre pep dere, ha digeit betek re pep frankiz wirion war
 dachenn ar c'henwerzh etre gourarmerzhioù ha krakarmerzhioù.
 Ma vez neuze ar reizhded kevarzhel oc'h arosod e vefe pep
 kenwerzh etrevroadel, dezhañ da vezañ denek ha divezek, o
 vastañ da vihanañ un doare keitlank bennak d'ar gevranndi.
 Ur pal eo, da vezañ tizhet war hirdermen evel reizh. Nemet
 e ranker, evit akuitañ ganti, krouiñ kevatalded wirion adalek
 bremañ war leur ar c'hevraouerezh hag an darboderezh*. Hag
 e seurt keñver e vefe mat sevel kengreadoù etrevroadel,
 gant un amgant ec'hon a-walc'h da bep unan : en o skeud e
 vefe savelet brasreizhennoù diouzh reoliekaat prizioù'zo,
 gwareziñ kenderc'hioù 'zo ha harpañ darn greanterezhioù yaou-
 ank o sevel. Fiv ne wel ket pebez skoazell berzhus, o tougen
 ganti madelezhioù, neket evit an ampoent hepken hogen da hir-
 badout, a vefe degaset e grad ouzh ar broioù war ziorren
 gant hevelep kedstrivererezh davit brasoc'h reizhded e par
 an darempredoù-kenwerzh etre ar pobloù ?

SKOILHOU DA DREC'HIN WARNO:

RIEZELOURIEZH*

62. Skoilhoù all a vez o virout na ve savet ur gevredigezh muioc'h reizh ha gwelloc'h frammet eget an hini gempredel e-keñver kedgred hollvedel : eus riezouriezh ha gouennelouriezh eo e fell Dimp ober anv amañ. Reizh eo moarvat evit kevrediniezhoù nevez-deuet en o rezid stadel bezañ gwrac'h gant un unvaniezh vroadel silwink c'hoazh, ha strivañ d'he difenn. Diouzh reol ivez, evit broadoù diwar hensevenadur, tennañ lore'h eus ar glad o tont dezho digant an Istor. Nemet e rank trivliadoù ken erbedus bezañ divedet* gant ur garantez o vriata remz an dud en e bezh. Gant ar riezouriezh avat e vez troc'het ar pobloù diouzh o mad gwirion. Ha peurgetket noazus e c'hallfe hounnezh dont da vezañ e kement lec'h ma vez gwander an armerzh broadel o c'houramplegañ kentoc'h kedstriverzh, kevouiziadurezh ha kedskor kellidel, diouzh kas da benn ar steuñvoù -diorren ha reiñ o lusk d'an eskemmoù kenwerzhel ha sevenadurel.

GOUENNELOURIEZH

63. Magañ gouennelouriezh n'eo ket perzh ar broadoù yaouank nemeto, kuzhet ma vez ganto dindan stumm erez o c'hoari etre kavilhadoù hag etre strolladoù dinazel, tra noazus-kenan moarvat evit ar reizhded hag arvarus ivez e-keñver senadurezh enriezel. War hed an oadvezh trevadennel en e bezh, e reas hounnezh he reuz alies etre trevadennelion ha brodorion*, war-bouez kaelat ouzh pep kefrediezh* frouezhus ha c'hwezhañ gourvenn bras, da heul direizhderioù gwerc'hel. Estreget ma vez c'hoazh o kaelat ouzh pep kenober etre broadoù difeuzik, hag o hadañ diskefrediezh ha droukrañs e diabarzh ar Riezoù

zoken, seul wech ma vezer eno direizhek oc'h embreger nep hanbarzherezh*bennak war hiniadoù ha tiegezhioù en abeg d'o gouenn pe d'o liv, e koul*ouzh brientoù didorrus an den.

WAR GLASK UNVEZ HOLLVEDEL

64. Gwall c'hlac'haret Omp gant seurt enkadenn, p'emañ-hi ken droukseblantus o pouezañ war an dazoned. Hag evelkent e vagomp spi vat e teuor, diwar emouezañ donoc'h ouzh an ezhomm da genober, koulz ha diwar Lemmoc'h kedgredegezh, da drec'hiñ war bep diskefrediezh ha pep emerc'hegezh. Goanag a viromp e vo gouest ar broioù teukoc'h gant o c'hresk da denañ gounid eus o c'hevamezegiezh evit aozañ kenetrezo, war dachennadoù-tir frankoc'h, diorreidigezh kendoniet o rannbarzhioù*, war-bouez terkañ kensteuñvoù, kempoellaat ar postadurioù, dasparzhañ kenderc'h ar madoù, kempenn an eskemmerezh. Hag evit kel an aozadurioù kevrannek hag etrevroadel, Hon eus fiziañs ivez, gant ma sevenint kement azveradenn o deus ezhomm, e kavint d'o zro kement disentez o tiskouez d'ar pobloù bepred isdiorreet penaos tec'hel diouzh ar milendalloù ma hañvalont bezañ bac'het, ha penaos dinoñ dre o fenn o-unan, en ur chom feal atav d'o speregezh, an araezioù diouzh mont fonnusoc'h war-raok e parzh ar gevarzhelezh hag an deneliezh.

AR FORLOU O REN PEP HINI HE ZONKADUR

65. Rak hennegh eo ar pal da dizhout. Diwar-bouez kedgred o ren gweredusoc'h-gweredusañ* dre ar bed, e vo gallet reiñ tro d'an holl bobloù da vezañ, pep hini diouzh he zu, gwir weredourez he zonkadur. Re alies e veze gwechall diazezet an darempredoù etrevroadel war geñverioù-nevzh nemeto. Salv ma teuy an deiz ma vo gwelet perzhioù evel gouvri ha kouvranteriezh

keveskemm, etredalc'hindegezh* war dachenn ar c'henlabour, kenderc'haverezh gant unangredegezh* o siellañ pep hentadurezh etre ar broadoù. Emañ ar pobloù yaouankoc'h ha gwanoc'h o c'houlenn ma vo roet dezho brasoc'h perzh-ober da sevel ur gevredigezh-tud a vo gwelloc'h ha doujusoc'h e-keñver bri-entoù ha galvidigezh pep hini. Reizh eo seurt goulenn : ra vo neuze klevet ha sevenet gant an holl.

III - K A R I T E Z H O L L V E D E L

Emañ ar bed o kleñvel. Hogen, kentoc'h eget lakaat an droug war gont an hiniennigoù a vez o sonnañ pe o rastellat ar madoù, e tleer kalz muioc'h en tamall d'an diouer a ged-
vreuregezh etre an denion hag etre ar pobloù.

DLEAD AN HERBERC'H

67. Biken ne vo re bouezet ganimp war dlead an herberc'h, - dlead a gedgred etre tud hag a garitez etre kristenion, - oc'h araez koulz an tiegezhioù hag an aozadurioù sevenadurel e kement riez herberc'her a zo. Ret eo dreist pep tra kreskiñ niver an oaledoù hag an herberc'hvanoù evit ar re yaouank, ma vint gwarezet e seurt giz ouzh an digenvez, ouzh merzad an dilezed, ouzh an estrenvan a vez o terriñ pep nerzh divezel en o c'hreiz; ma vint ouzhpenn dienket er stad vlinderus m' emaint enni, rediet evel e vezont da geñveriañ barr-paourentez o bro c'henidik gant ar roufl* hag ar foranerezh a vez dis-paket alies dirazo; ma vint pelloc'h goudoret ouzh atahin an damkaniezhoù dispac'hus hag an atizoù razailhus a grog enno, pa sav en o c'houn diventelezh "o flanedenn reuzeudik ha gour-vestel (58)"; ma c'hellint en diwezh dont da gavout dreist

pep tra, kevret gant gwrez un herberc'husted kedvreurek, skouer ur vuhezgezh direbech, revil ur wir garantez kristen hag ober-ius, revil an talvoudoù speredel.

DROUKVERZH KEFREDERION YAOUANK

68. Mantrus e vez Evidomp soñjal e niver an dud yaouank aet war o studi da vroioù spletusoc'h da gerc'hat gouizadurezh, ampartiz ha stummadurezh*, dezho da vezañ gouestoc'h da bledañ gant o broad, ha penaos e vezont eno moarvat o prenañ perzhgezh* dreist, evit siwazh dont aliesoc'h-aliesañ da goll revil an talvoudoù speredel a vez stag peurvuiañ, evel un hêrezh uhelbriz, ouzh ar stuzegezh ma'z int bet diouti desavet.

LABOURERION DIVROET

69. Dleet eo e vefe graet an hevelep degemer ivez d'ar wezh-ourion divroet, pa vezont o reuziñ ouzh amveziadoù alies an-
denek hag oc'h arboellañ diwar o gounid evit assaat un tammik bihan d'o zlegezh chomet en e vro c'henidik da ziwaskañ tavant-
egezh.

KEVARZHEGEZH

70. Ar re galvet gant o c'hefridi da vont da vroioù nevez-
voulc'het o greanteladur ganto, e tenn Hon eil erbedenn dezho, da lavarout eo : ar c'hreantourion, ar genwerzhourion hag ivez mistri pe leuriaded embregennoù* brasoc'h. Moarvat e c'hall bezañ na ve ket diank dezho pep kevarzhegezh pa vezont en o bro c'henidik : perak neuze plegañ da bennsturioù digar an em-gerc'hegezh, pa vezont o labourat e broioù gwanoc'h o diorre-
adur ? Gant ar saviad uhel a zo dezho, e tlefant er c'hontrol

bezañ douget da dreñf da wastadourion war dachenn an enraog-
 erezh kevarzhel hag an dere'haverezh deniezhel, ne vern pe
 da lec'h e vent kaset gant o c'hefridi. Dre berzh o c'henurzh-
 iegezh* na ve ken, e tlefont dont da spurmantif penaos talv-
 oudekaat labour ar vrodorion, stummañ micherourion berzhok,
 danzen ijinourion ha sternourion, lezel ganto frankoc'h in-
 trudu, aotren dezho sevel deiz goude deiz betek ar pennstael-
 ioù hag, e seurt giz, o lakaat e tro da berzhiadekaate e kred-
 elezhioù*ar renerezh. Ra vo neuze ar reizhdad ac'hoel o reoliñ
 e pep mare an hentadurezh etre renerion ha renidi. Ra gavo
 houmañ sol war gevratoù reizh, anat warno erlegezh*an dleadoù.
 Salv enderlik na vo den, forzh pehini e gendere, o venel an-
 dial* e droukdiviz an disreol*.

KIMINGADEZIOU-DIORREN

71. Un drugar eo Dimp evelkent gwelout niver bras-ouzh-bras
 an arbennigourion a vez leuriadet evit kimingadezioù-diorren,
 koulz gant ensavadurioù etrevroadel pe lieskevrannek, koulz
 gant aozadurioù prevez; en o c'herz emañ dreist pep tra "neket
 ober o renkoù, hogen ober evel gwaredourion* ha kenlabourerion
 (59)". Rak, dont a ra buan ur boblañs da verzout hag eñ e vez
 douget he skoazellerion pe get gant ar gouvrantiez, hag eñ
 ne glaskont tra ken nemet kalvezadoù nevez pe neuze dere'haviñ
 talvoudegezh an den en e bezh. Pa ne vez ket karantez ked-
 vreurek evel oc'h anadif war o negez, e vez houmañ war sin da
 vezañ dizarbennet.

o

PERZHIOU AN ARBENNIGOURION

72. Ma ne c'haller ket tremen hep gouestoni galvezel, n'haller
 ket ober kennebeut hep anatadur ur garantez diemgerc'h. Distrob
 enta diouzh kement brazoni o tennañ d'ar riezouriezh evel
 diouzh kement doare gouennelouriezh a zo, emañ d'an arbennig-
 ourion deskif diouzh ar c'henlabour presour gant pep den, pa
 c'houzont ervat n'eo ket diwar o gouestoni galvezel e teu
 dezho dreistelezh war holl dachennoù ar vuhez. Dougen ganti
 danvez denelouriezh hollvedel e ra moarvat ar stuzegezh ma'z
 int bet stummet diouti, daoust ma ve arabat da houmañ tremen
 da hinidik ha diskarzhidik* na kennebeut bezañ degaset en ur
 rannved bennak, anez dezhi dereadekaate outi. Damant ar c'hos-
 kor o vont d'ober seurt kimingadezioù ra vo neuze klask atav
 dizoleif, war un dro gant hanez ar vro m'o devo-int kavet
 bod enni, solwez* ar speredegezh ha pinvidigezh ar sevenadur
 anezhi. Da heul, e savo kenhoal frouezhus etre an eil stuz-
 egezh hag eben.

KEVRAOU ETRE AR STUZEGEZHIOU

73. Koulz hag etre pep hinienn, e vez gwir gevraoù rik oc'h
 engehentañ kedvreuregezh etre pep stuzegezh. Gant se, diwar
 embreger an diorren, e vo gwelet kenhoal o sevel etre ar
 pobloù e par ar strivadennoù kevredin renet evit kas pep
 sevenadenn da benn, hogen war an diviz ma vo an holl gwiti-
 bunan, adalek ar riezourion hag o leuriaded, betek ar bihanañ
 kalvezour, o vegañ karantez kedvreurek ha youlegezh wirion,
 evit ma vo savelet war an douar ur stuzegezh nemati diaezet
 war gedgred hollvedel. Neuze c'honvat e tigoro kendivizerezh
 buket ouzh an den e gwirionez, naren ouzh kenderc'hadoù pe
 galvezadoù. Frouezhus e vo hennezh, gant ma tesko c'hoazh,

bennozh dezhañ, kement pobl a zo penaos gwellaat he stuz danvezel ha speredel; ivez gant ma troio pep kalvezour da genteliour ha ma skedo war e geleñnadurezh arouez ur speredelezh hag un divezelezh graet evit kadarnaat neket enraog an armerzh hepmuiken, hogen hini an denegiezh ivez. Peur-dremenet neuze pranted ar gwarederezh*, e teuy an darempredoù skoulmet e seurt giz da vezañ padus. Piv ne wel ket pebezh pouez he devo hentadurezh seurt gant hounnezh e-keñver hez war an douar ?

GALV D'AR YACUANKIZOU

74. Kalz yacuankizou o deus respontet endeo gant amdizh ha birvidigezh da c'halvadenn Hon Diaraoger, hetus an eñvor anezhañ, Pius XII, oc'h annouezh al likelezh d'an abostolerezh. Stank ivez ar re o deus kinniget o skoazell hep termal da vont e stern aozadurioù kevredik pe zigevredik da genlabourat gant ar pobloù war ziorren. Hag un drugar eo Dimp gouzout e c'hall ar "gwazerezh milourel" gant lod riezou, dont da vezañ "gwazerezh kevredigezhel", evit un darn, pe zoken "gwazerezh" na mui na maes. Hevelep arbennoù hag ivez an dud a youl vat ouzh o seveniñ, e Tougomp bennozh warno. Salv ma teufe neuze kement hini a vez oc'h emginnig diouzh* ar C'hrist da glevout outañ pa lavar : "Rak naon am eus bet ha roet hoc'h eus din da zebrñ; sec'hed am eus bet ha roet hoc'h eus din da evañ; estren oan, ha bod am eus bet diganeoc'h; en noazh, ha bet gwisket ganeoc'h; klañv, ha da'm gwelout ez oc'h deuet, bac'het, ha da'm betek ez oc'h deuet (61)". Ne c'hell den chom diseblant ouzh tonkad e vreudeur atav beuzet en o dienez, reuziñ ma reont diwar an digelennded ha droukdiviz an andiogel. Dirak ur seurt ezeved, e tlefe pep kristen

bezañ fromet e galon evel kalon ar C'hrist pa lavare : "Truez am eus ouzh seurt engroez (62)."

PERDIN HAG OBER

75. Ra savo gredus enta pedenn pep hini davet an Hollc'halloudeg, evit ma strivo remz an denion, emouez ouzh poanioù ken bras, d'o distrujañ gant o meiz hag o youl. Nemet e vo ret d'an nen, da heul e bedenn, ober e vennoz groñs da c'hourzhbellat* an isdiorreadur, pep unan hervez e nerzh hag e c'halloud. Salv ma teuy an dud dre hini, ar stolloù kevredigezhel hag ar broadoù, da ginnig o dorm an eil d'egile gant kedvreuregezh, ar c'hadarn o harpañ an digadarn da sevel, war-bouez degas dezhañ kement gouestoni, kement gred ha kement karantez a vo diemerc'h en e greiz. Rak, piv bennak a vez lusket gant gwir garantez, a vez barrek, muiget neb all, da gavout chem a-walc'h evit diguzhañ kement abeg a zo d'an dienez, kement araez da stourm outi hag ivez evit trec'hiñ warni hep fallaat. Neuze, aozour hez anezhañ, "e kendalc'ho hennezh gant e hent, en ur hadañ levenez hag en ur fuilhañ sklêrijenn ha madelezh e kalon an dud war an douar kevan, o reiñ tro dezho d'arvestiñ, dreist da gement speurenn, c'azh dremmoù breudeur, dremmoù ken-eiled (63)."

DIORREADUR EO ANV MBVEZ AR PEOC'H

76. Disparelezhioù re vras etre ar pobloù war dachenn an armerzh, ar gevarzhelezh hag an dicueziant eo a vez o tevoudañ bec'h ha diskefrediezh, hag o lakeat ar peoc'h en arvar. Evel ma Lavaremp da Dadoù ar Goursened, ha Ni distro d'ar gêr, graet ganimp beaj ar peoc'h betek Sez ar Riezou-Unanet : "dleet eo ez afe saviad ar pobloù arsioren* d'ober danvez

pep preder ganimp, dleet eo, pa lavarimp mat, evit a sell ouzh ar bevion a zo dre ar bed, - hag ur vordilh diniver ez eus anezho, - e teufe hor c'harantez en o c'heñver da vezañ muioc'h pressour, muloc'h oberius ha muloc'h brokus (64)." Stourm ouzh an dienez, gourzbellat an dirizhded zo blein-luskañ*, e-ser gourhevouñ an holl, kreskerezh deniezhel ha speredel pep unan, ha diwar-henn, mad kevredin an denelezh kevan. Arabat e ve strishaat ar peoc'h d'an ezvrezel*, o vezañ ma vez hemañ frouezh atav kizidik ar c'heñverioù-nerzh. Deiz goude deiz eo e vez adailadet ar peoc'h, war-bouez youl-iañ d'an urzh a zo memmet gant Doue hag a vez oc'h amplegañ brasoc'h reizhded etre an dud (65).

TEC'HREL DIOUZH AN DIGENVEZ

77. Hag int unanweredourion o c'heskadur goubarel, emañ e kerz ar pobloù da gentañ sammañ pep kredelezh anezhañ. N'eo ket avat o venel en digenvez e c'hallint akuitañ gentañ. Kengradoù rannbarzhel etre ar pobloù gwan, dezho da zougen dorn an eil d'an all, emglevioù brasoc'h evit dont war o skozell, kevratoù uhelgerc'heloc'h* etre an eil re hag ar re all evit savelañ raklunioù kendoniet : sed aze kemend-all a bester-arcueziañ war hed un hentadur-diorren evel hemañ davit hez.

WAR GLASK UN AOTROUNIEZH VEDDL OBERIUS

78. Seurt kenobererezh etrevroadel o tennañ da vezañ b'edel e vez gentañ gourampliget ensavadurioù diouzh e brientiñ, e gempoellaat ha ren warnañ betek mont d'amparañ un urzh reizh-oniell anavezet gant an holl. A greiz kalon enta e Kennerzhomp an aozadurioù o deus kemeret seurt kenobererezh war o c'hont, e grad ouzh an diorren, ha hetañ a reomp dezho kaout beli o

vont bepred war vrasaat : "Galvet oc'h, a Lavaremp da leur-iaded ar Riezouñ-Unanet e New-York, da lakaat da gedvreuregañ kenetrezo, neket lod eus ar pobloù hepken, nemet an holl bobloù war un dro." Fiv ne wel ket pegen ret ez eo dont da savelañ plaendiheverz e seurt giz un aotrouniezh vedel barrek d'ober emell berzhus war an dachenn reizhoniell ha dinazel (66)?

MAGAN GOANAG EN UR BED GWELLOC'H

79. Darn a soñjo ganto moarvat n'eo seurt goanagoù nemet loar-iegezh na mui na maes. O gwerc'helouriezh* dezho avat a c'hell-fe a-walc'h ivez bezañ nammet marteze, pa n'int ket bet evit merzout gremmusted ur bed, c'hoant dezhañ da vevañ gant brasoc'h kedvreuregezh, hag eñ, daoust da bep diouziagezh ha da bep fazi daoust, a zo kaeroc'h, da bep pec'hed, da bep distro d'an an-warez* ha da bep dihenchedenn hir diwar arroudenn ar silvidigezh o tostaat koulskoude kammed goude kammed ouzh e Grouer, hep rat dezhañ zoken. Amplegañ striv hag emaberzh e ra c'honvat un hent seurt gant hennezh : hogen, ar boan hec'h-unan, pa vez darbennet gant an unan dre garantez evit e vreudeur, ne ra nemet frouezh-usaat betek ar barr kresk an denelezh kevan. Hag ar gristengred-ourion n'emaint ket hep gouzout e vez an unvaniezh gant Hor Salver o tarbar da sevel Korf ar C'hrist en e gefleunder* sev poblad Doue gevanstag.

KEDGRED ETRE AN HOLL

80. Dre ma ne c'haller mont gant hevelep hent nemet war-bouez kedgred etre an holl, ez eo bet felllet Dimp degas da soñj da bep hini pegen spontus oa ar walenn ha pegen mallus an oberenn da seveniñ. Bremañ c'honvat emañ deuet ar mare da werediñ, rak, da c'houzout eo ha bez'e c'halllo kemend-all a vugale diantek

dreistbevañ, kemend-all a diegezhioù reuzeudik arziraev denekoc'h dere; daoust ha tu a vo da ziwall ar peoc'h war an douar koulz ha dazoned ar sevenadurezh. D'an holl dud neuze ha d'an holl bobloù da gemer warno sammañ pep unan e gredel-ehzioù.

G A L V D I W E Z H A Ñ

KATOLIGED

81. Hor mibion, an holl anezho, eo e fell dimp aspediñ da gentañ. Dezh eo gwir eo da gemer war o c'hont, evel un trevell diouto, reneveziañ urzh ar gevredigezh er broioù war ziorren koulz hag e pep lec'h all. Rak, mard eo kefridi an Urzhaz Santel kelenn ha rikdeveizañ dedalvezadur pennvonioù an divezouriezh war hevelep tachenn, al liked c'honvat emañ en o c'herz ober, - war-bouez embreger dre o zid ha kuit a c'hortoz dizintrudu pep gourc'hemenn ha pep sturiadurezh digant ar re all -, diouzh ma vo treantet gant ar skiant kristen speredegezh, boazioù, lezennoù ha frammadurioù ar Gevredigezh ma vevont enni (68). Razas, kemmoù hag azveradennoù don zo d'erounit : dezho-int eo neuze d'ober bec'h dizamant evit ma c'hwezho spered an Aviel war seurt azveradennoù. Goulenn a reomp dreist-holl ouzh ar Katoliged a zo dindan riezou pinvidikoc'h perzhiadekaet, gant o gouestoni hag o skoazell oberiant, e labour an aozadurioù kevredik pe zigevredik, keod-edel pe gravezel a vez oc'h akedin da drec'hiñ war anezioù ar broioù skarz o diorreadur. Sur omp n'o devo-int ken mennad nemet bezañ war ar renk kentañ gant ar re a striv da lakaat divezegezh da ren etre ar broioù, diwar-bouez reizhded ha gwironi.

KRISTENION HA KREDOURION

82. Diarvar Omp e klasko an holl gristenion, hag i breudeur Dimp, unvaniñ ha kendoniañ o strivadoù mui-ouzh-mui, dezho da skoazellañ an dud da drec'hiñ war an emgerc'hegezh, al lore'h hag an erez; da baraat ouzh pep trec'hoant ha direizhder, da zigeriñ da bep hini hent ur vuhez denekoc'h, ma c'hello nep piv bennak bezañ karet ha harpet evel ur breur gant e nesañ. Ha Ni c'hoazh neuze dindan from Hon emwel bizeñvoradus* gant an dud hag ar strolladurioù kravezel liesseurt nann-kristen hon eus kejet outo e Bombay, setu m'o Fedomp adarre da boanial gant holl nerzh o c'halon hag o meiz, evit ma c'hello bugale an dud holl gwitibunan ren ur vuhez dellezek eus bugale da Zoue.

TUD A YOUL VAT

83. Erziwezh e troomp Hor spered war-du an holl dud a youl vat emouez ouzh an devoud emañ hent ar peoc'h o tremen dre an diorreadur. C'hwi, Leuriaded an aozadurioù etrevroadel, c'hwi ar Stadourion, ar stlennourion, an desavourion, gant an holl ac'hanoc'h ha gant pep unan en e framm eo e vo savet un urzh vedel nevez. Setu perak ez Aspedomp an Doue Holl-c'halloudeg da sklêrijennañ deoc'h ho meiz ha da gadarnaat ho kalon en ho kreiz, ma vo ganeoc'h emcueset ar menno boutin ouzh ar seurt kudennoù loskus, ha broudet ar pobloù d'o di-rouestlañ. C'hwi, an desavourion, emañ en ho kerz atizañ e kalon ar re yaouank ar garantez e-keñver ar pobloù estrenvanet. C'hwi, ar stlennourion, emañ ar strivadoù, diwasket evit erluskañ ar genskoazell etre ar pobloù, da vezañ lakaet ganeoc'h dindan hon daoulagad-ni, koulz hag arvestadeg ar poanioù ken stank e vez techet atav an denion da raskañ diwar

o spered, e sell da derriñ war o morc'hed : deskêt ar binvid-
ion ac'hoel emañ ar bevion e toull o dor o c'hedal ar ramagnoù
diwar o banvezioù.

STADOURION

84. Stadourion, en ho kefridi-c'hwi emañ morloc'hañ* ho kevrediniezhoù e sell eus gwerc'hoc'h kedgred etre bediz, hag ober dezho da gentañ darbenn kement arboelladenn a rankor seveniñ diwar o gourfonn hag o dispignachoù, evit ma vo kaset an diorren war-raok ha miret ar peoc'h e savete. Ha c'hwi, Leuriaded an aozadurioù etrevroadel, warnoc'h ivez e tibenn erlec'h-iañ ouzh pep gourzhtalerezh* bellgar, arvarus ha difrouezh, kenobererezh c'hwek, hezus ha diemgerc'h etre an holl riezoù, evit ma c'hello gentañ an denelezh ober he c'hresk diwar-bouez kedgred, ha pep unan dre hini sevel en e vleuñv.

DOZION

85. Dre ma'z eo re wir avat ez eus maritell dre ar bed, gant an dister ar preder ennañ, e Tec'halvomp neuze ar speredseion hag an dozion, kement katolig ha kristen a zo, nep piv bennak o kehelañ Doue, nep piv bennak itiket gant groñstalc'h, reizhed ha gwirionded, da lavarout eo an dud a youl vat holl gwi-tibunan. Ha war-lerc'h Jezuz-Krist e Kredomp adober outo an aspedenn daer : " Klaskit hag e kavot (69)"; grit, war-bouez kenskonzell kenetrezoec'h, war-bouez perveshant ho teskadurezh ha ledannaat ho kalon, ma tigoro dirazoc'h an hentoù da vont ganto davit ur vuhez, brasoc'h emni lod ar gedvreuregezh e stern ur geduniez hollvedel* gwirion.

HOLL D'AL LABOUR

86. C'hwi holl enta, klevout ha ma rit ouzh gouelvan ar pobloù kaezh, ha strivañ d'o diboaniañ, e sellomp-Ni ouzhoc'h evel gwastadourion ha, koulz lavaret, evel ebestel an diorreadur mat ha gwirion, sev an hini na vez ket o keveleriñ gant ar binvidigezh krinvuzek neu garet eviti hec'h-unan, hogen gant an armerzh aet e gourc'hemenn an den hag ivez gant ar bara pemdeziek diogel d'an holl evel andon ar gedvreuregezh hag arouez an Doue Peurvastour.

BENNOZH

87. Enderlik e Tougomp bennozh warnoc'h a wir galon, ha gervel an holl dud a youl vat evit ma teuint da genhoslañ ganec'h evel ma ra gwir vreudeur kenetrezo. Rak, mard eo splann e talv hiziv diorreadur kement ha hez, piv neuze ne garfe diwaskañ poan ha trevell evitañ ? Ho pediñ a reomp neuze an holl ac'h-anoc'h da respont gant birvidigezh d'Hor c'halvadenn ankeniek.

oooo

Roet e Roma, war dreuzoù Sant Pêr, gant Gouelioù Pask,
26 Meurzh 1967.

PAULUS PP VI

NOTENNOU AR GELC'HELENN

- (1) Kv. ACTA LEONIS XIII, t. XI (1892), p. 97-148.
- (2) Kv. AAS 23 (1931); 177-228.
- (3) Kv. AAS 53 (1961), p. 401-464.
- (4) Kv. AAS 55 (1963), p. 257-304.
- (5) Kv. dreist-holl negez-skingomz an 01.06.41 da geñver 50-veder RERUM NOVARUM, in AAS 33 (1941), p. 195-205; negez-skingomz Nedeleg 1942, in AAS 35 (1943), p. 9-24; annerc'h d'un tolpad gwezhourion da geñver liddeiziad RERUM NOVARUM, d'ar 14.05.53, in AAS 45 (1953), p. 402-408.
- (6) Kv. Kelc'helell MATER ET MAGISTRA, 15.05.61, AAS 53 (1961), p. 440.
- (7) GAUDIUM ET SPES, n. 63-72, AAS 58 (1966), p. 1084-1094.
- (8) Motu proprio CATHOLICAM CHRISTI ECCLESIAM, 06.01.67, AAS 59 (1967) p. 27.
- (9) Kelc'helell RERUM NOVARUM, 15.05.1891, ACTA LEONIS XIII, t. XI (1892), p. 98.
- (10) GAUDIUM ET SPES, n. 63, § 3.
- (11) Kv. Lukaz 7,22.
- (12) GAUDIUM ET SPES n. 3, § 2.
- (13) Kv. Kelc'helell IMMORTALE DEI, 01.11.1885, ACTA LEONIS XIII, t. V (1885), p. 127.
- (14) GAUDIUM ET SPES, n. 4, § 1.
- (15) L.J. LEBRET, o.p. DYNAMIQUE CONCRETE DU DEVELOPPEMENT, Paris, Economie et Humanisme, Les Editions Ouvrières, 1961, p. 28.
- (16) 2 Tessalonikiz, 3. 10.
- (17) Kv., da skouer, J. MARITAIN, Les Conditions spirituelles du progrès et de la paix; in RENCONTRE DES CULTURES A L'UNESCO SOUS LE SIGNE DU CONCILE OECUMENIQUE VATICAN II, Paris, Mame, 1966, p. 66.
- (18) Kv. Mazhe, 5, 3.
- (19) Gen. I, 28

- (20) GAUDIUM ET SPES, n. 69, § 1.
- (21) I Yann, 3, 17.
- (22) DE NARUTHE, k. 12, n. 53, FL 14, 747. Kv. J.R. PALANQUE, Saint Ambroise et l'Empire Romain, Paris, de Boccard, 1933, p. 336 ...
- (23) Lizher da dud ar "Sizhunvezh Kevredigezhel" e Brest, in L'HOMME ET LA REVOLUTION URBAINE, Lyon, CHRONIQUE SOCIALE, 1965, pp. 8 ha 9.
- (24) GAUDIUM ET SPES, n. 71, § 6.
- (25) Kv. ibid., n. 65, § 3.
- (26) Kelc'helenn QUADRAGESIMO ANNO, 15.05.1931, AAS 23 (1931) p. 212.
- (27) Kv. da skouer, COLIN CLARK, THE CONDITIONS OF ECONOMIC PROGRESS, 3^e embannadur, London, Macmillan and Co., New-York, St-Martin's Press, 1960, p.3-6.
- (28) Lizher da dud ar "Sizhunvezh Kevredigezhel" e Lyon, in LE TRAVAIL ET LES TRAVAILLEURS DANS LA SOCIETE CONTEMPORAINE, Lyon, Chronique Sociale, 1965, p. 6.
- (29) Kv. da skouer, M.D. CHENU, o.p., Pour une théologie du travail, Paris, Editions du Seuil, 1955.
- (30) MATER ET MAGISTRA, AAS 53 (1961), p. 423.
- (31) Kv. da skouer, O. Von NELL-BREUNING, s.j., WIRTSCHAFT UND GESELLSCHAFT, t. I : GRUNDFRAGEN, Freiburg, Herder, 1956, p. 183-184.
- (32) Efeziz, 4, 13.
- (33) Kv. da skouer, Mgr M. LARRAIN BERRAZURIZ, Eskob Talca (Chili) Kadoriad ar CELAM, LETTRE PASTORALE SUR LE DEVELOPPEMENT ET LA PAIX, Paris, Pax Christi, 1965.
- (34) GAUDIUM ET SPES, n. 26, § 4.
- (35) MATER ET MAGISTRA, AAS 53 (1961), p. 414.
- (36) L'OSSERVATORE ROMANO, II.09.65; DOCUMENTATION CATHOLIQUE, t. 62, Paris, 1965, Coll. 1674-1675.
- (37) Kv. Mazhe, 19, 6.
- (38) GAUDIUM ET SPES, n. 52, § 2.
- (39) Kv. ibid. n. 50-51 (ha notem 14), ha n. 87, § 2 ha 3.
- (40) Ibid. n. 15, § 3.
- (41) Mazhe, 16, 26.
- (42) GAUDIUM ET SPES, n. 57, § 4.
- (43) Ibid. n. 19, § 2.
- (44) Kv. da skouer, J. MARITAIN, L'Humaniste intégral, Paris, Aubier, 1936.
- (45) H. DE LUBAC, s.j., Le Drame de l'Humanisme athée, 3^e embannadur, Paris, Spes, 1945, p. 10.
- (46) PENSEES, embannadur Brunschwig, Nn 434; Kv. M. ZUNDEL, L'Homme passe l'homme; Editions du Lien, 1944.
- (47) Annerc'h da Leuriaded ar c'hraveziou nann-kristen, d'an 03.12.1964; AAS 57 (1965), p. 132.
- (48) Jakez, 2, 15-16.
- (49) Kv. MATER ET MAGISTRA, AAS 53 (1961), p. 440 ...
- (50) Kv. AAS 56 (1964), p. 57-58.
- (51) Kv. ENCICLICHE E DISCORSI DI PAOLO VI, vol. IX, Roma, embannadur Paoline, 1966, p. 132-138; DOCUMENTATION CATHOLIQUE, t. 43, Paris, 1966; coll. 403-406.
- (52) Kv. Lukaz, 16, 19-31.
- (53) GAUDIUM ET SPES, n. 86, § 3.
- (54) Lukaz, 12, 20.
- (55) Negez da Vediz, fiziet er c'helaouennou, d'ar 04.12.1964. Kv. AAS 57 (1965), p. 135.
- (56) Kv. AAS 56 (1964), p. 639 ...
- (57) Kv. ACTA LEONIS XIII, t. XI (1892), p. 131.
- (58) Kv. ibid., p.98.
- (59) GAUDIUM ET SPES, n. 85, § 2.
- (60) Kv. Kelc'helenn FIDELI DONUM, 21.04.1957, AAS 49 (1957), p. 246.
- (61) Mazhe, 25, 35-36.
- (62) Mark, 8, 2.
- (63) Annerc'h gant Yann XXIII da gefver bastidigezh Pius Balzan, d'an 10.05.1963, AAS 55 (1963), p. 455.

- (64) AAS 57 (1965), p. 896.
 (65) Kv. Kelc'heleenn PACEM IN TERRIS, 11.04.1963, AAS 55 (1963), p. 301.
 (66) AAS 57 (1965), p. 880.
 (67) Kv. Efeziq, 4, 12; LUMEN GENTIIUM, Nm 13.
 (68) Kv. APOSTOLICAM ACTUOSITATEM, Noù 7, 13 ha 24.
 (69) Lukaz II, 9.

) o ((

GERIOU WAR O LERO'H UR STRENNIG

Nnn 1 KEVREDIGEZH - Evit bremañ, ha keit ha ma ne vo ket kemmet ar Gevredigezh ma vevomp enni, e vo ret ober alies gant ar ger "kevredigezh" evit treiñ "social".

Sk.: "buhez kevredigezh"; gwalenn gevredigezhel"; kudenn gevredigezhel", ha zoken kelemm-ndurezh kevredigezhel".

Padal, pa vo empleget gant ar ger kudenn ar reizhded etre tudennoù, tudelezhioù pe genelioù, kudenn ar gwirioù hag an dleadoù o sevel gant hini ar reizhded ha zoken kudenn an oberiezh renet e sell da seveniñ pe d'enraok ant ar reizhded, e vo gwelloc'h arverañ diwar bremañ ar ger "KEVARZHEL",

Sk.: "arvelloù kevarzhel".

Menegiñ a ranker ivez ar ger "KEVARZHEK" a verk emzalc'h un hinienn pe ur strollenn o stourm evit lakaat mennozioù kevarzhel da dalvoude, da lavarout eo, evit ma renfe brasoc'h reizhded diwar vrasoc'h kevatalded war gement tachenn gevredigezhel a zo.

Sk.: "ur pennembregour kevarzh; "ul levierezh kevarzh".

Ar ger "KEVREDAD" a ro ivez "KEVREDADEL" evit liveañ perzhioù o tennañ d'ar bodadoù liesseurt a gaver e stern ar Gevredigezh hag emichañs da vuhez arbennik an dud o kendaremprediñ e diabarzh seurt bodadoù betek heñvelseurt.

Sk.: "sez, pal kevredadel un aozadur evel ar "General Motors" hag ivez "darempredoù kevredadel etre merc'h ha mamm" (e stern ar c'hevredad ma'z eo an tiegezh).

Evel reizh "KEVREDIGEZH" a c'hell ivez bezañ arveret mat-kenan e-lec'h "kevredigezh" pe zoken "kevredadel", pa vez anv eus darempredoù-buhez etre an dud, ken e stern ar Gevredigezh, ken e stern ur c'hevredad bennak.

Nnn 1 GOURSENVED - En destenn c'hallek e lenner 'Concile Oecuménique'. Amañ ne dalv ket "oecuménique" kement hag un adanv da "oecuménisme", "kediligegezh". Ur ster arnevez zo gant hemañ diwezhañ, kalz kempleshoc'h eget an hini kozh, en abeg da hirbadelezh ha da hirhoali an diserran etre ar gristenion. Ar ster kozh oa "hollvedel" ha "katolik", hervez talvoudegezh kent ar ger-mañ. E brezhoneg ez eo a-walc'h neuze treiñ ar bomm "Concile oecuménique" gant "Goursened", da lavarout eo hervez un hentenn a zo diouzh anien hon lavar.

EN AREMPRED. Diwar Fleuriot, 'ARIMRRET', ober war dro, gwazañ; e gwazonezh, e gourc'hemenn.

Nnn 3 AR VONREIZHIAD PASKOURIEL - En destenn c'hallek "Constitution Pastorale". PASKOURIEL, diwar-benn 'paskouriezh'. Ar baskouriezh zo lod eus ar Feizdoueoniezh o sellout ouzh an hentennoù a rank ar baskourion (eskibion ha beleion) embreger evit kas war rack avieliidigezh ha kristenidigezh an dud. Savet em eus ar ger-mañ o soñjal e komzou Jezuz da Dêr : "PASK VA DENVED".

'Paskouriel' zo da ziforc'hañ diouzh 'Paskourel'. Sk.: Lizher paskourel, d.l.e. lizher o tont digant un eskob, kentañ paskour ur vroez.

KEVADEGEL - Pezh a zo d'an ampoent; ampoentel. "Kevadegel" avat zo kenster gant 'kempredel'. "Ampoentel" o vezañ tostoc'h e ster ouzh "actuel" en destenn c'hallek, da lavarout eo ouzh "devezel" "gouezel" "keñ" "bezant". "Simultané" zo "kevampoent". Arabat treiñ neuze "actuel" gant ar ger-mañ.

Nnn 5 LAZENN b. - "causa" e latineg; diwar "laz" ("deur").

Nnn 5 EMELL OUZH - "Emellout ouzh" zo gweredif evit mad unan bennak pe un dra bennak. Disheñvel eo diouzh "emellout e".

Nnn 5 KEDUNVAN ad. - Meur a wech e vo kavet amañ anvadoù savet gant ar rakger 'KED' e-lec'h 'KEN'. Arveret e vez "KED" pe vanner pouezañ war geal an unvaniezh don. Un diforc'h a c'hell bezañ etre "kenunvan" ha "kedunvan", hervez ma vez gouzañvet, laosk ha diwar c'horre an unvaniezh, pe hervez ma vez er c'hontrol karantezus, gredus, don hag oberiat. E seurt giz e vo kavet amañ gwech an amzer 'kedgarantez' ha 'kedpredegezh' evit pouezañ war

donder ha gwirionded ar gengarantez pe ar gengredegezh (skiant-kengred).

Gwechavez e ranker zoken ober gant 'KED' e-lec'h 'KEN' evit spisaat ster ar ger. Un diforc'h bras ez eus, da skouer, etre 'kenvreur' ha 'kedvreur' peogwir e tenn 'KED' amañ da liavañ an unvaniezh hag ar garantez don etre daou zen o tremen da 'vreudeur' an eil evit egile. Hep 'KED' amañ, e chomfe skort kevyezhadur 'fraternité' e brezhoneg. Re wan e vefe ar ger 'breuregezh' hepken, peogwir e tenn ar ger-mañ da liavañ un doug-natur na mui na maes. Bez' e c'hall breudeur (pe c'hoazh kenvreudeur e parzh ur vicher bennak) mazañ kasoni an eil evit egile. Mard int neuze breudeur hervez ar gwad pe neuze kenvreudeur hervez ar vicher pe hervez ur saviad all bennak, n'int ket 'kedvreudeur' pell ac'hano !

Revelep diforc'h ez eus ivez etre 'kenstriverezh' ha 'kedstriverezh', peogwir e c'haller strivañ en ur gevret hep kedunvaniezh ebet (kenstrivañ hepken), pe, a zo kaer-oc'h, kenstrivañ an eil enep d'egile. (kenstrivañ gant ster kevezañ). 'Kedstrivañ' zo enta kenstrivañ kedunvan.

NOTENN - Kavet e vo ivez 'kevouziadurezh', 'keyem-anaoudegezh', 'keyamezegezh' e-lec'h 'kenouziadurezh', h.a.

Nnn 6 BONEZELEZH b. - Diwar ar ger henvrezhonek 'BONEZ', 'nobled' ha diwar se 'meurdez'. Gwell eo treiñ 'dignité' gant 'bonezelezh' eget gant 'dellid' a zo da virout evit lavarout 'mérite'.

Nnn 6 KREDELEZH b. - Un diforc'h a ran etre 'KREDEGEZH', (atebegezh), emzalc'h atebek, ha 'KREDELEZH', ergoreladur seurt emzalc'h.

Nnn 7 TREVEDIKEREZH HA TREVADENNOURIEZH.

TREVEDIKEREZH g. zo korvoerezh na mat na fall drezhañ e-unan. Sevenet e vez-eñ gant trevidion, an trevidig o vezañ da gentañ penn ur frammatar hag ur gwastadour, e gefridi lakeat barregezhioù ur vro dindan gorvo. Moarvat keit ha ma ne vez anezhañ nag alouberezh rik na mac'homerezh rakratozhet, e chom reizh an holl d'an holl evit ar broioù-liv (zoken ar re bet trevadennet diwar alouberezh) labour niver a drevidion wenn.

TREVADENNOURIEZH b. zo war un dro damkaniezh hag ersav, mennoziadeg hag emzalc'h e par ar seurt trevadennion, trevidion fall anezho, n'int bet e gwir nemet

laeron ha mac'homerion, alouberion hag 'impalaerelourion'.
Da skouer, an darn vrasañ eus riezou Europa zo bet trev-
adennour e-keñver ar broioù-liv, peogwir e troas lod bras
eus warlerc'hidi an drevidiou gent da drevadennourion, en
abeg d'ar mennoziou mestroniour direizh maget gant ar Stad
hec'h-unan en o bro c'hendik.

Nnn 9 INTRUTALUAD - Diwar ar ger 'TALUAD', 'pennad-amzer'.
Ger gwelloc'h hep mar eget 'stretant'.

Nnn 9 BOC'HODARC'HIEZH b. ('hoc'hot' = 'nebut'). 'Oligarchie'
en destenn c'hallek.

Nnn 9 INTRUDU - 'Propria iniciativa' eo ster dik 'intrudu'; ne
dalv ket ar boan enta treiñ 'propria' ('person-
nelle' e galleg).

Nnn 11 GOURZHINLEK - 'seditiosae' e latineg.

Nnn 11 KEALREIZHIADOU KEVERVESTRONIOUR -
KEALREIZHIAD b. Reizhiad e kement ha m'emañ
diwar gealioù hepken. Tud 'Walarn' a rae ivez gant 'mennoz-
iadeg'.

KEVERVESTRONIOUR ad. o tennañ d'an 'totalita-
rismus'. 'Kever' = 'total'. Aet eo 'kever' d'ober 'ker'
e brezhoneg, da skouer 'kerzu'. N'eo ket eus 'beli' hepken
ez eus keal gant 'totalitarismus' hogen eus 'mestroni'.
Genel a ra kent ar veli ha padout en diavaez dezhi, daoust
ma'z eo enstgouti. Da skouer, ar strollad boutinelour o
tisteurel kement strollad all ha kement luskad, zoken
marksour, na labour ket hervez an damkaniezh hag ar steufv-
où boutinelour zo kevervestroniour. Marteze e spirfe ivez
ur ger evel 'Keverelour', na mui na maes.

Nnn 12 KIMINGADEL - 'Misionerion'.

Nnn 12 NEVEDENMOU - 'sacris pedibus' e latineg.

Nnn 12 PENNSKOLIOU b. - Kalz gwelloc'h eo sevel gerioù kevan-
sozet evel hemañ, pe neuze skrivañ 'skolveur',
ioù' peogwir e skriver endeo 'skolveurel'. Adanv "penn-
skol" a vefe "pennskoliat". Ober a rafen gant "Skolioù
Meur" evit "Grandes Ecoles" e galleg, da skouer.

Nnn 13 AROSOD v. - Diwar ar c'hembraeg 'AROSOD'. Kavet e vez ivez
'GOSOD' en henvrezhoneg. Ar ster zo 'goulenn

groñs' da lavarout eo 'youliñ', 'gourarc'hiñ'. Mirout a
ran ar gerioù-mañ diwezhañ koulskoude evit treiñ 'exiger'
pa vez rener ar verb un den ha 'gouramplagañ', 'arosod'
en degouezhioù all. Tost eo ster 'arosod' da hini 'rediañ'.

Nnn 13 DIOUEZIANTEL ad. - An 'DIOUEZIANTE' (g) (di + gouez, diouez-
iañ) savet diouzh skouer ar ger kembraek 'DIWYLL-
IANT' (culture) zo, evidon-me, derez elfennel ar den dre
veizel, speredel, arzel o tont gwechall-gozh d'an den dre
hent an deskonriadur, hag en hon amzer dre ar skolekaat
elfennel hag ar c'helennerezh-etre, azot hag arosodet
gant pep kevredigezh kenurzhiet. Derezh uhelañ seurt buhez
a gevezehan gant ar ger 'KEFREDADUREZH'. Hag evit gwir,
keit ha ma chom an den war an derez 'dioueziantel', ne wel
AR GWIR, AR GENED hag AR MAD nemet evel en ur melezhour.
Gant ar kefredadurezh avat ('kefred' a dalv kement hag
'unan' dre an imbroud', meizañ, 'com +prehendere' e
latineg) e klask an den distremen, trehontañ ar melezhour
(unan itriket peurliesañ gant ar Gevredigezh) evit pakañ
ha kompren pezh a zo en tu-all d'an derez dioueziantel.
Gant tud "EMSAV" ha "PREDER" ez eo bet diskouezet fraezh
pegen didalvoud oa gerioù evel 'civilisation' pe 'culture'
e-skoaz ar gerioù brezhonek arnevez evel 'sevenadur',
'sevenadurezh' ha 'stuzegezh'. Hogen ken didalvoud-all
e chom amañ ivez ar ger gallek 'culture' e-skoaz 'diouez-
iant' ha 'kefredadurezh'. Da skouer, pa fell d'ur Galleg
menegiñ un den 'kefredadurek' ('ek' naren 'et') e ra gant
'cultivé', pezh a dalv e brezhoneg arnevez da lavarout
'stuziet', rediet enta ur stuziadur warmañ, pezh a zo mont
enep da ster gwirion ha denel ar ger 'kefredadurezh'.
Notomp ivez ez eo pec'hed gwelout ne ra Kembreiz nemet
gant ar ger 'diwylliant' bepred evit menegiñ holl gerezioù
an obererezh meizel, speredel, arzel ha, pezh a zo gwash-
oc'h, sevenadurel zoken !

Nnn 13 DINAZBELEREZH g. - Derc'hel start a ran d'ar ger-mañ evit
gevezehañ 'politikerezh'. 'Dinazel', bet kinniget
gant 'EMSAV', Nnn 25, ne dalv ket 'municipal', rak, e
galleg ez intenter keal ar 'gevredenn' (ar gumun), pa lav-
arer 'municipal'. Hag ar gevredenn zo amezhi ur c'heal
bonreizhel disheñvel diouzh keal an dinaz pe ar gêr. Estr-
eged ma n'eus ket dinazoù na kerioù eus kement kevredenn
a zo. Keal ar c'hevangelelaat ne dalv ket c'hoaz evit
bremañ. Er Stadoù-Unanet e tistroer zoken diwar geleñnad-
urezh ar c'hevangelelaat. Ar bourc'hadennoù maeziel zo

ivez kevredennoù. 'Municipalité', aozadur ac'rouniezhel ensavadekaet e stern ar gevredenn, zo neuze da vezañ troet gant 'kevredenniezh', ha 'municipal' gant 'kevredennel' na mui na maes. Hemañ a dalv 'communal' ivez, hogen n'eus diforc'h ebet e gwirionez e galleg etre 'communal' ha 'municipal'. Lavarout a reer hep digenn 'conseil municipal' koulz hag 'assemblée communale'.

'DINAZEL' avat am eus savet o kemer keal an Dinaz (ur ger dezhañ ster 'kreñvlec'h' da gentañ penn) evit kevvezhañ pezh a veze anvet polis (polis) gant Henhellaziz ha 'La Cité' e galleg hiziv an deiz, da lavarout eo ar Gevredigezh arvezet evel atil ha stern ar veli war un dro.

Sed amañ an termenadur a c'hellfed reiñ e brezhoneg pa reer anv eus hevelep keal : 'An Dinaz (pe spisoc'h c'hoazh an Dinazelezh) zo domani haniezel difetis ar strivoù diwasket evit gounit pe virout barr ar veli e stern ur Riez, ur Stad, ur vroad pe ur Reizhiad zoken (skouer ar Varkouriezh hag ar Gevalcouriezh).

Hogen, petra eo ar politikerezh ma n'eo ket an obererezh, ar stourm end-eeun evit gounit pe, ur wech gounezet, evit mirout barr ar veli e penn ur gevredigezh lavaret? Seurt obererezh o tennañ d'ar galloud war ar gevredigezh hag andoniet er gevredigezh n'hall bezañ dec'heriet nemet gant un termen arbennik o chom tost ouzh hini ar polis (polis) arveret gant an Henc'hresianed : an dinaz. Setu perak e kevvezhan 'politikerezh' gant ar ger 'DINAZELEREZH'. Ober dinazelerezh, pe mar kerer, 'dinazelat' zo neuze evit un aozadur andoniet en e gevredigezh klask perc'hennañ pe virout perc'hentiezh ar 'c'hreñvlec'h' nemetañ, 'an Dinaz', n'eus tu ebet hepzi da ren war ur gevredigezh (pe ar Gevredigezh gant 'G' meur pa vez anv eus galloud ur reizhiad).

'Dinaz' zo ivez kenster gant 'Neli ar Palez', sev beli ar strolladoù politikel trec'h e penn ur Stad, tra ma vir 'KRODED', evidon-me, ster kevredigezh vestroniet renet ha melestret. Gant an Dinaz, atil ha stern kevredigezhel ar galloud (ouzh hec'h ober renerion ha dilennourion peurvuiañ) eo e vez stummet, desavet ha stadekaet ar Geoded (anezhi kevredigezh ar renidi hag atil ar stuzegezh da gentañ penn). Gant ar werinvelouriezh c'hlan hag ar Gevredelouriezh Klok e klasker bremañ lakaat stadegezh ha stuzegezh da genglotañ, da lavarout eo, lakaat Dinaz ha Keoded da gendeuziñ. Hogen ret e vo ivez d'ar werinvelourion 'dinazelat' kalet kent bezañ trec'h e Riezoù bras Europa. An Dinaz a van bepred enta ur c'heal diforc'h-kreñn diouzh hini ar Geoded.

Nnn 14 MA C'HOUEVAN OUTO - 'Gougevaniñ' n'eo ket hepken degas ur pezh bennak en hevelep stern hag ur pezh all, evel ma'z eo desteriet gant ar ger gallek 's'inscrire' en destenn. Gougevaniñ zo, war un dro, lec'hiañ hag eran kenetrezo pezhioù dishañval e diabarzh un hevelep stern, dezho da c'hellout levezoniañ an eil egile. Gougevaniñ a ziskouez amañ ivez e tle an diorreadur, evitañ moarvat da levezoniañ ar sevenadur, chom bepred e dalc'h hag e sentur ar sevenadur. Da skouer, ne c'hall ket an DEN BREZHON NEVEZ degemer ar mennoz e tlefe hervezañ ar Brezhoneger distaurel pe wall-egañ zoken e sevenadur war zigarez e nozfe hemañ ouzh e ziorreadur ! N'omp ket mui hiviziken evit meizañ e c'hall-femp diorren war nep tachenn bennak, nemet e brezhoneg e vefe. Gougevanet pe c'hoazh "gougevan" eo hon diorreadur e Breizh ouzh hon sevenadur brezhonek.

NOTENN. Amañ ez arveran 'gougevaniñ' en ur stumm oberiet, evel ma reer alies e brezhoneg : gant ar ger 'stagañ', da skouer. 'MA STAG OUTO', a c'hall, evel ouzer, bezañ komprenet 'MAZ'EO STAGET (pe 'STAG') OUTO.

Nnn 15 'KENDILADUREZH' b. - Diwar Fleuriet 'CINTIL'. 'Kendilañ' zo ouzhpenn desevel ur bugel, dezhañ da c'hellout bevañ hervez lezennoù e gevredigezh, enaouñ en e greiz pep blizidigezh ret evit ma trehonto pep emzalc'h, pep buhezadur seurtanvet divezel, dre glask e geñveriañ bepred ouzh un emzalc'h, ur buhezadur uhelskouerel bennak ha peurgetket ouzh divezouriezh diles e gravez evel ma'z eo bet bevet gant an Diazezeour anezhi. D'am soñj ar gendiladurezh zo mui pe vui d'an desavadurezh ar pezh ez eo ar gefredadurezh d'an dioueziant, rak dindan an eil meizadur hag egile e kave kudenñ an dibr a ra pep den pa vez o sevel war an derez kefredadurel pe gendiladurel. Ar gendiladurezh ne vez ket stag avat na dreist-holl levezonet dre ret gant ar gefredadurezh, rak ken disheñval eo ar gefredadurezh diouzh ar gendiladurezh, war an dachenn embregel, ha ma'z eo ar meizañ diouzh ar youliñ.

Nnn 16 DIWAR E VONDOUG - 'sua sponte' e latineg.

Nnn 16 ARZTRAEZ - 'accedere' e latineg.

Nnn 16 DENELOURIEZH TRELANKAT - da lavarout eo denelouriezh o trelankañ ('o kaout dreistlank war', gwell eget 'dreistlank') ar stuzegezh voutin anavezet.

Un diforc'h a ran etre 'trelankat' ha 'trehontel' (a TRELANKAT (transcendans) o trelankañ, da lavarout eo o tennañ d'an dreisteladur, d'an esweladur e stern ar bed boutin. (b TREHONTTEL (transcendantalis) a verk un dreistelezh trabedel sev en tu-hont d'ar bed boutin. Ur ger prederouriel rik eo hemañ diwezhañ.

Nnn 16 AMKANELEZH b. - Pinvezelezh. An amkanelezh zo ar pal (umkan) sellet e par an natur anezhañ ha neket e par an neb a denn dezhañ, peogwir e c'hall hemañ bezañ kumveizet ha distreset gant an den.

Nnn 17 BUZIAT ad. - "bénéficiaire" e galleg.

Nnn 17 KRHNTEREZH g. - 'Mutua necessitudo' e latineg. 'Communications' e galleg.

Nnn 17 'TTLU' g. - Ger kembraek arveret amañ evit treiñ ar ger 'familia' gant ur ster dishañval-krenn, evel reizh, diouzh ar strolenn tad, mamm ha bugale pe zoken kerentiad dre ar gwad dre vras.

Nnn 18 KRINDED b. - En testennoù gallek ha latinek e kaver : 'avarice', 'avaritia', hogen gant un arliv dishañval diouzh an hini boutin eztaolet gant 'pizhoni', 'krezni' h.a. E latineg pergen e talv 'avaritia' stad ur galon aet krin diwar he c'hoantegezh. Setu perak e ran gant "KRINDED", an dibenn "DED" o livañ ster an difetiz. Sk.: 'krinder' un douar hogen 'krinded' un den, sev un den o premañ war bep amgrausted, pep haelled hag emroüsted.

Nnn 19 FORC'HTALVOUD g. - Anv hag adanv war un dro. Forc'htalvoud zo kement ha talvoud forc'hellek, da lavarout eo un talvoud o tegas saviadoù dishañval. Lakaet e vezer gantañ peurliesañ dirak ur forc'hegen. Fraezh eo ar forc'hegen amañ : ar c'hreskadur o vezañ, diouzh un tu, ar redi da greskiñ evel den, ha, diouzh an tu all, ar strobineñ o tont diwar hoaladur ar gourfonn armerzhel hag ar binvidigezh danvezel sellet evel an hollvad n'eus nemetañ.

Nnn 20 GOURARVESTEREZH - 'Contemplatio' e latineg. Ur ger arbennik-resis eo hemañ, stummet diouzh skouer

'GOURSAV' ha kar dezhañ e gwirionez, rak bez' e c'hall ar gourarvesterezh devoudañ goursav e par ar c'hevriour. Dre vras ez eo ar gourarvesterezh an obererezh spredel dreist stag ouzh ar goursav kevriour, da lavarout eo un unvaniezh arbennik gant Doue.

Nnn 21 IZEGAD-DEVAÑ g. - an dafar izek sellet evel ar pep retañ evit ar vevidigezh. E-keñver 'izegad' hon eus 'uc'hegad'.

Nnn 21 EMGERC'HEGEZH b. - 'égocentrisme' e galleg, 'égoïsme' en destenn. Ar ger 'emgarantez' n'eo ket a-walc'h e brezhoneg, rak heñvelster eo ivez ouzh 'embarc'h!', 'em-zoujañs' an den outañ e-unan', pezh a c'hell bezañ un dleed enebet, da skouer, ouzh an emlazi. 'Emgerc'hegezh', en diac'hin, zo emgarantez droukyoulennek o kerc'hat an unan, pe mar kerer, ar 'me!', ha, diwar-benn, o vogañ krinded kasaus ha diseblanted kriz e-keñver deurioù ha mad an nesañ. 'KRINUVZEGEZH', diwar an adanv 'krinvuzek' (gwel.Nnn 24) e denn muioc'h d'an emgerc'hegezh e-keñver korvodur danvezel ha perc'hentiezh ar madoù.

Nnn 21 'GOURFRED' g. - Diwar Fleuriot 'GURPRIT', 'dic'hoñvor', 'dreistmuzul'. Diwar ar ger-mañ e vo kavet amañ da heul 'gourfredel' evel adanv.

Nnn 21 REVIL g. - 'doujañs'; ger mat evit keyvezhañ 'estime' e galleg.

Nnn 21 SKIANT AR PAOURENTEZ - Ar baourenitez a zo meneget amañ n'eo ket an hini a vez rediet war an den gant ar Gevredigezh. Biskoazh n'en deus ar C'hrist embannet e tle mab-den asantiñ d'an dienez danvezel. N'eo ket enta eus ar baourenitez danvezel ez eus kel amañ, hogen eus 'paourenitez an Aviel', anezhi un emzalc'h, kentoc'h eget un devoud, o c'hourdonaat an den ouzh skiant an emziouer e-keñver an holl vadoù, zoken ar reoù difetiz a-wechoù, hag ar re 'spredel', kaerañ pezh a zo, pa vez anv eus kevriouriezh.

Nnn 22 DIWEZHAR ad. - 'diweddar' e kembraeg, 'recens' e latineg. Moarvat e vefe gwel skrivadurif 'diwegar' hag ivez 'diwez' e-lec'h 'diwez'.

Nnn 23 FOURC'HBT ad.v. - Kontrol 'dibours'h'. Ar ger resis avat a vefe 'anavatet' (diwar 'anav' 'ops.') da

lavarout eo 'deust anav', pe welloc'h c'hoazh, roet anav war anav, madoù war vadoù dezhañ en e gerz.

Nnn 23 AR FOURC'HEDED - Ur 'pourc'hed' zo heñvelster gant 'den pourc'het', sev un den ne ra netra diouer dezhañ war dachenn ar madoù danvezel. 'ANAVEDED' (nantis) a vefe resisoc'h ivez.

Nnn 23 EZDIVIZEL ad. - E-maez pep diviz. 'Inconditionnel' en destenn.

Nnn 23 PERC'HENTIEZH C'HOUBAREL - GOURAREL - Diwar 'Fleuriot "GUPAR", prevez, dreist-holl prevez d'ur perc'henn, ster tost-kenañ ouzh 'proprius' e latineg.

Nnn 23 EZHOMMOU PENNRINKEL AR GEVREDINIEZH - Ezhommoù o tont war ar renk kentañ (penn + renk) hag o tennañ d'ur gevredigezh riezal. Gwir anv hevelep kevredigezh zo "kevrediniezh" (kumaniezh) pa ne seller nemet ouzh he buhez diavaezel ha danvezel, ha 'kedhinienn', pa gantvezer he buhez diabarzh hag he c'hevala speredel (stuzegezh ha sevenadur).

Nnn 24 TALVEZADOU HEGERZ - Arc'hant laosk ha dioueradus.

Nnn 24 SOULMERZH b. - En destenn latinek 'nimii quaestus consilia' hag en destenn c'hallek 'spéculations'. E galleg bremañ e lavarer atav 'spéculation', zoken pa vez anv gwerzhañ en tu-hont d'ar priz, hep an disterañ riskl evel reizh. Gwechall avat e lavared 'SURVENTE', dres 'SOULMERZH' e brezhoneg.

Ne vern penaos, n'haller ket ober amañ gant sterioù all ar ger 'spéculation', da lavarout eo na gant 'brok-erezh' war an dachenn gellidel, lec'h ma c'hoari elfenn an arvar hag an taraz, na kennebeut gant 'imbrouderezh' anezhañ ur ger prederouriel rik.

Nnn 24 KRINVOZEK ad. - En destenn latinek 'in sum duntaxat utilitatem capta', hag en destenn c'hallek 'égoïstes' hepken. Gwelloc'h eo ganin amañ kompezañ galleg ha latineg dre sevel an adanv 'krinvuzek' (gwel Nnn 21 uheloc'hik). Amañ ez eo spisoc'h ar ger, peogwir e tis-kouez hag e laka war wel emgerc'hegezh mab-den e koulz ha ma vez ahelet e vuhez gantañ war gorvodur ar madoù danvezel. Keñveriañ ivez ar ger gant 'krinded' enebet ouzh 'emrousted' (Nnn 18).

Nnn 24 ANAVIOU - 'ressources' e galleg. 'Anav' (ex 'anoo') a dalvez dres kement hag 'opes' e latineg. Gwel. Fleuriot (VEEG 59) ha Vendryes (LEIA A-73). Gant ar ger-mañ ez eus tu da sevel 'anavadur' 'enrichissement' hag 'annvata' 'nantir'.

Nnn 24 AMREAL g. - Diwar 'Fleuriot "IMROGAL", 'oberiantiz' hag 'obererezh' war un dro; ger pleustrek-tre.

Nnn 26 AR BERG'HENTIEZH DIGEVREDIK - sev ar berg'hentiezh prevez. 'Perc'hentiezh c'houbarel' a vo kavet ivez a-wechoù dre an destenn, 'goubarel' o talvoud dreist-holl 'pricodol' e kembraeg. Perc'hentiezh kevredik a dalv, evel ouzer, peadra ar gevredigezh. Fezh nad eo ket goubarel, prevez, zo neuze boutin, kevredin, da lavarout eo, mad an holl e stern ur gevredigezh (kevrediniezh) pe c'hoazh e stern ar Gevredigezh ("public" e galleg).

Ne wellan ket perak e rankfed ober gant 'foran' evit treiñ 'public'. Kement gwech ma talv "public" e galleg 'kevredin', evel e stern bommoù diouzh skouer 'droit public' hag all, e ranker kevyezhañ gant 'kevredik'. 'Foran' a dalv 'a-ouez d'an holl' hag ivez 'profane'. E galleg e lavarer 'public' evel reizh, e degouezhioù 'zo, ha setu perak em eus, da skouer, troet "défense publique des pays plus pauvres" (hervez an destenn latinek) gant 'difennerezh foran ar broioù paourc'h' (gwel. Nnn 4 an destenn). Disheñvel-kremm eo avat ster 'foran' diouzh hini 'kevredik', e bommoù evel 'gwir kevredik', 'acozadurioù 'kevredik', 'enklask war dalvoudegezh kevredik ur raktres' hag all. N'eus nemet 'kevredik' a gement a c'hellfe spletiñ pa vez kel eus kevredigezh, kevrediniezh ha Meradurezh-Stad. Ne seblant ket lod eus tud "IMSAV" bezañ meizet ervat an dra.

Nnn 26 IMPALABREZH - 'GOURHEIZH' a vefe ar ger keltiek mat e gwirionez. (Gwel. Nnn 52 "GOURHEIZH". MBSTRON-IBREZH a vefe mat amañ ivez.

Nnn 27 GOURGRED g. - En destenn c'hallek e kaver "mystique du travail" o talout kement ha 'gred ambrenk evit al labour' pezh a gevyezhan gant 'gourgred', ur ger hemañ goveliet ganin diwar batrom 'goursav' h.a. Fall-put e vefe

treiñ gant 'kevrincouriezh', rak resis eo bremañ ster an termen-mañ e brezhoneg.

Nnn 27 RIZH b. - Diwar an henvrezhoneg "RITH", 'image' e latineg.

Nnn 27 SKIANTARGEZH b. - "Sensibus" e latineg; pezh a zo mat, hag e galleg 'sensibilité', pezh a zo kenkoullz all ivez, hogen war an diviz na vo ket kevyezh 'sensibilité' gant 'kizidigezh' e brezhoneg. Ret eo amañ ober gant ur ger o taveiñ da c'halloudegezh vredel ar ski skiantoù-korf (skianterezh) hag o liveañ ar perzh denel stag outi. N'eus nemet 'skianterezh' a gement a ve reizh amañ neuze.

Nnn 27 DERC'HAVEGEZH b. - 'Ambition' en destenn c'hallek. Arabat kammveskañ ar ger-mañ gant 'derc'hovegezh' ha 'derc'havardur' 'erluskerezh - erluskadur' 'bleinluskerezh - bleinluskadur' davit un derez uheloc'h pe c'hoazh 'briekadur' en un derez uheloc'h, da lavarout eo 'promotion' e galleg.

Amañ e talv an envad da ziskouez youl-vonezelezh, emzalc'h an den a glask drezañ e-unan sevel (derc'haviñ) hag akuitañ gant ur vicher pe ur gefridi bennak, war-bouez strivañ ha labourat. Ur ster erbedus eo hini ar ger-mañ. 'Ambition' gant ar ster-gwashaat ha dierbedus a vefe kentoc'h 'arvezhegezh' diwar 'arfeth' e krennger-neveureg, ur ger hemañ ha dezhañ un arliv goprel tost da 'gavallherezh' ha d'un termen all am eus arveret endeo "trec'hoant".

E-lec'h 'derc'hovegezh' e vefe mat ivez ur ger evel 'uhelgerc'hegezh' (gwel. Nnn 77 'uhelgerc'heloc'h') holl-ekoc'h e vefe marteze ar sterva anezhañ.

Nnn 28 DIVEZEGEZH b. - 'Conscience' en destenn, gant ster ar galleg 'sens moral'; diwar 'DIVEZ', 'Morale' anv-kadarn.

Nnn 28 BARR-TROU'HAD g. - 'stature parfaite', e galleg.

Nnn 29 TIRC'HOUEZPREZH g. - Arabat krediñ e ve 'Agriculture' hiziv an deiz kenster gant 'gounezerezh an douar-arat' hepken. Ret eo krouiñ anvadoù diouzh saviad ar vuhez arnevez. Setu perak e ran amañ gant 'tir'. Ne vern penaos 'gounezerezh' hepken ne spir ket hiziv petra bennak ma spire gwechall kement, ma oa deuet 'gounideg' da vezañ heñvelster gant 'labourer-douar'.

Nnn 29 DIFRETEK ad. - 'brusqué' en destenn c'hallek; mat e vefe amañ ivez 'primc'hreanteladur'.

Nnn 31 GWERO'HDL ad. - 'réel' 'positif' e galleg.

Nnn 32 NEVEZOURIAT ad. - 'novatrice' en destenn c'hallek; diwar 'nevezouriñ' 'innovare' e latineg, an dibenn 'at' o tiskouez amañ ster oberiat an adanv.

Nnn 33 EMBREG g. - Gwelout "EMBRÉGAD" izeloc'h. Heñvelster eo gantañ hogen difetisoc'h c'honzh; evel "intrudu" hogen lenneoc'h ha hep ober dove d'an amptiz da gentañ evel ma ra "intrudu".

Nnn 33 HERIAN. - Kv. "her"; diwar ar ger kembraek 'herio', 'to challenge' e saozneg, 'risquer' en destenn c'hallek.

Nnn 33 EMBRÉGADOU g. - da geñveriañ gant 'embregadenn', nemet e tem 'embregad' da lavarout 'luskad-embreger' kentoc'h eget 'oberatadenn-embreger'. En destenn c'hallek 'initiatives'. (Gwel. ivez Nnn 70. "Embregenn", "embregerezh".)

Nnn 34 UNANWEREDOUR g. - 'self-maker' e saozneg hag e kembraeg 'humanweuthurwr'. Mat eo ober gant 'unan' a zo breur da "hunan" e kembraeg. Un doare eo da kevyezhañ mat-kenan troiennoù gallek evel 'propre artisan'.

Nnn 34 RAGWEZBRION - Diwar 'rac-guoad' (Fleuriot). "Devanciers" e galleg - 'Rakpennerion' a ve mat ivez.

Nnn 34 KALVEZARC'HOUREZH b. - kalvezvestroni, 'technocratie' e latineg. 'Kalvezveliezh' ne blij ket din : re greñv eo. Arabat ober gant 'beli' bep tro.

Nnn 34 EZHOMMEGEZH b. - 'Exigences' en destenn c'hallek. Mat e vefe ivez 'gourarc'hegezh', diwar ur verb evel 'gourarc'hiñ' bet arveret endeo ganin. (Gwel. Nnn 54).

Nnn 35 SKOLEKAAT - Skolekaat zo stourm ouzh an diskolegezh pe digelenned c'hroñs. An diskoleg n'eo ket hepken an hini na oar na lenn na skrivañ. Skolekaat n'eo ket lizherennekaat hepmuiken evel ma'z eus bet graet re bell amzer marteze. Bremañ lizherennekaat zo kenster gant skol-

ekaat, sev deskiñ ivez da dud kozh ha yaouank, dre ar skoliata, en tu-hont d'ar bu-ha-ba, an doare da vevañ gwelloc'h. Un deskoni-hevoud eo ar skolekaat e pep keñver. Setu perak ez eo gwelloc'h ober gant ar ger-mañ eget gant lizherennekaat.

E galleg e kaver ivez 'éducation de base' a c'hellfed keyezhañ gant "bonstuziekaat" ha "bonstuziadurezh", hogen kaeroc'h a ginnigan gant ar ger 'dioueziant'. (Nnn 13).

Nnn 37 GOUSTRAEDET - Bezañ goustraedet zo kouezhañ en ur c'houstraed pe straed-dall.

Nnn 37 ARBENNOU g. - 'mesures' en destenn c'hallek, gant ster 'disenteziñ'. Gwelloc'h mirout 'abeg' evit treiñ 'cause', 'motif'. Bez'e c'haller ivez ober gant 'darbaroù'.

Nnn 37 BANNVILI b. - 'kembeli', kentoc'h gant ster 'jurisdiction' eget gant ster 'compétence'.

Nnn 37 PARAD g. - Gwelloc'h eo ar ger-mañ eget 'koublad' a zo galleg, evit lavarout 'priedoù'.

Nnn 37 ANESTREKADUS ad. - Na c'heller ket 'estreakat', 'arall-ekaat'. Bravoc'h ha berroc'h eget 'diarallekadus'.

Nnn 37 HILIAN - ober hil, 'hilic' e kembraeg, 'gouennañ', 'procréer' e galleg.

Nnn 40 E GRAD OUZH - 'pro' e latineg, 'en aviz' evit mad. "En faveur de" e galleg. Arabat kemmeskañ 'e grad ouzh' gant 'e grad', 'diouzh grad' 'e diviz' 'au gré de'..

Nnn 40 KESENTIN GANT - diwar Fleuriot 'decesintim', 'asantin da'.

Nnn 40 E VUHEZ - Sklaer eo ar ger e brezhoneg arnevez, 'buhez' enebet ouzh 'beved' o talvoud kement ha 'buhez speredel' hiziv an deiz.

Nnn 41 DISTAG DIOUZH AN TRAOU - Amañ e fell d'ar Fab lavarout ez eo mat d'ar spered kaout tro da zistagañ diouzh madoù an douar. Ret eo d'ar spered neuze gouzout petra eo bezañ stag ouzh hevelep madoù !

Nnn 41 GLENNADURIOU - Traoù ar glenn, an douar, enebet ouzh traoù an neñv.

Nnn 42 DISKARZHIDIK - Diwar Fleuriot 'discarthas' 'a rannas'. Hevelep bonad gant 'argarzh'. E galleg 'exclusif'. Gwel. Nnn 72.

Nnn 42 REIZHMENN DEVEZHEL AN TALVOUDO Arabat sellout ouzh an den evel ouzh ar pennvon dreist ma ra dave dezhañ kement talvoud a zo. Ikaat an den dreist da Zoue e vefe se.

Nnn 42 KEVERDREIST - Ar ger-mañ, hag eñ ses a-walc'h, e ran gantañ evit treiñ pergen diwar al latineg 'mirum quantum transcendit' hag e galleg 'passe infiniment'. En un doare skianteloc'h em dije gallet keyezhañ : 'Emañ an den o keverdelankañ an den' (Gwel. Nnn 16 'Denelouriezh trelankat'.)

Nnn 43 KEDGRED - evit 'kengred' (Gwel. Nnn 48 'Kedredegezh')

Nnn 43 KEFREDIEZH b. - 'Concordiam' en destenn latinek, ar 'hontrol o vezañ 'diskefrediezh', ur ger bet arveret ganin endeo.

Nnn 43 KOUVRANTIEZH b. - Mignoniezh tomm ha kardek-tre.

Nnn 44 ARAEZET - 'concerne' en destenn c'hallek; diwar Fleuriot "ARHAID", 'diraez'.

Nnn 47 KAEZHADUR g. - Chadenn, sklavelezh fetis.

Nnn 47 KEMEDOU g. - Tailhoù; diwar Fleuriot 'comit' (mit = mediñ). Ar c'hemedou zo e gwir meder an arc'hont.

Nnn 48 KEDGREDEGEZH b. - 'solidarité' e galleg gant ar ster 'esprit de solidarité'. Ober a ran gant 'Kedgredegezh' evit diforc'hañ diouzh 'kengredegezh' a zo kenster gant 'kenatebegezh'. Gwelet hon eus e skriven ivez 'kedred' (Nnn 43); e seurt giz e c'haller diforc'hañ 'kedgret' 'solidaire' diouzh 'kengret' 'co-responsable', rak un arlivig ez eus.

Nnn 48 AN DOUE PEURVASTOUR - 'providenti Deo' en destenn latinek, sev an Doue o vastañ da bep ezhomm denel, evel ar Peurvoud ma'z eo, e sell da silvidigezh ar bed. Hervez

kelennadurezh an deologiezh diwar-benn ar Feurvasterezh (ger gwelloc'h, a sav din, eget 'Ragevezhierzh), e vez Doue o vostañ da wir ezhommou an den, o vezañ ma vez, evel Feurvoud, o ren an darvoudoù hag ar groudelezh davit ar finvez bet merket gantañ d'ar groudurion. Rak-tal e weler ez eus kevrin amañ, peogwir ne glot ket bepred, nag alies, mennad Doue ouzh hon hini, e-keñver ezhomm ha mad an den. Henezh eo kevrin ar c'henglotadur etre difaziusted Doue hag an droug, etre difaziusted Doue ha rezid an den. Amañ e kaver sol ar feisdoueoniezh e gwirionez. Ar pezh a zo diogel avat eo en deus Doue bastet da remz an denion, e stern ar groudelezh hag ar C'hras, kement elfenn ret e-keñver beved ha buhez speredel, da bep unan ac'hanomp da gaout e walc'h war an douar ha da vezañ gwenvidik er bed all.

"La Providence" e galleg a c'hell bezañ troet mat-kenan e brezhoneg gant 'Ar Feurvastour'. Dre heñvelidigezh ouzh ersav hag obererezh Doue, hag un tamm dre fent peurliesañ, ez eus tu ivez emichañs da gevvezhañ 'l'homme-providence' 'l'homme providentiel' gant 'ar feurvastour' (gant ur 'p' bihan) pe, da skouer, 'l'Etat-Providence' gant 'ar Stad-Feurvastour' h.a.

"Providentiel" hervez ar ster teologel rik a vefe 'feurvastourel'; hogen, hervez ar ster boutin a roer dezhañ peurvuiañ, emañ da vezañ troet gant 'hetus', 'evurus', 'feuzik'; da skouer 'un dargouezh feuzik', "un hasard providentiel" gouez d'ar C'hallaoued.

- Nnn 48 DALC'HIADDEG g. - En destenn c'hallek 'ressortissant'.
- Nnn 49 DRE SOUL - 'dre forzh', ha dreist-holl 'dre re (ober)'. (Gwel. "soulwerzh" Nnn 24). An hevelep bonad a gaver ivez gant gerioù evel 'souriñ'.
- Nnn 50 KENDONNET - o toniañ an eil gant egile, 'kendivizet'; en destenn c'hallek 'concerté'.
- Nnn 52 HUADEGEZH b. - Dalc'hiadegezh direzid-krenn. En destenn c'hallek 'dépendance'.
- Nnn 52 O DIRGELIN - 'Dirgeliñ' = 'dissimulare' en destenn latineg; diwar ar ger 'dirgel' = 'kuzh'. E kembraeg 'celu' hag ivez 'dirgelu'.
- Nnn 52 GOURHEIZH g. - Pennaotrouniezh, pennvestroniezh dinazel;

diwar Fleuriot 'heith', 'dominatus' e latineg. 'Heizh' a drofe mat 'domination' e galleg. Amañ e talv ar ger 'GOURHEIZH' da lavarout "empire", "hégémonie" e galleg. Gwel. Nnn 26 ma lavaran e vefe keltiekoc'h 'gourheizh' eget 'impalaeriezh' ivez. Da heul e vefe gwel neuze arverañ 'gourheizhek' ha 'gourheizhegezh' e-lec'h gerioù evel 'impalaeregezh'. Ne vefe mui ezhomm kennebeut eus 'impalaerelour' (gourheizhek) nag eus 'impalaerlouriezh' (gourheizhegezh), rak 'impérialisme' e galleg a dalv da livañ un emzalc'h ha tra ken. Muioc'h ha kaeroc'h, tro a vefe diwar ar bonad 'heizh' da dreiñ "absolutisme" gant 'KEVREHEIZHEGEZH'. Skouer : 'keverheizhegezh Ioeiz XIV'.

- Nnn 53 GWERZH O ANV - hervez an droienn gembrak brav-kenan : 'GWERTH EU HENW', 'dellezek eus o anv'.
- Nnn 53 BELLAVADEG b. - E galleg 'course aux armements'. Gwell eo amañ ganin arverañ 'bell' (brezel) hag 'aveadeg' (pourenadeg an dafar e-sell ar brezel).
- Nnn 53 ANC'HOUSAÑVUS ad. - 'Dic'houzañvus' hervez Vallée. Kreñvoc'h avat eo an anvad gant ar rakger 'an'. Kinnig a ran 'anc'houzañv' evit ober meneg eus unan bennak na c'hell ket gouzañv, sev boazañ ouzh ur boued pe ur magadur bennak. Sk.: ur bugel anc'houzañv ouzh al laezh. Hogen diwar-benn un den hep damantiz ouzh mennozioù ar re all e lavarin ez eo andamantek. E galleg e lavarer "intolérant" koulz evit 'anc'houzañv' hag evit 'andamantek'. 'Anc'houzañvus' avat zo da vezañ troet e galleg gant "intolérable".
- Nnn 54 KEVRAOUAT v. - Verb resis evit lavarout 'kengomz', 'kendivizout'. Diwar Fleuriot 'cobrou'. 'kevraou'.
- Nnn 54 GRADUS ad. - "gratis", evit netra. Diwar ar ger 'grad', hemañ evel 'rhad' e kembraeg o tont eus 'gratia' e latineg. Keñveriañ gant ar ger gallek "gracieux"; sk.: "à titre gracieux".
- Nnn 54 STUMMGAMPI g. - Rihan-gampi. 'Stumm' a dalv amañ da dreiñ "minime" e galleg; 'parvis usuris' e latineg.
- Nnn 54 LAKAAT ... DA GENLAC'HAN - Ger evit ger lakaat kempouez da ren kenetrezo; lakaat kemparzh.

Nnn 54 GRADEKAAT v. - 'favere' e latineg. Ger savet ganin evit lavarout 'tuañ gant', 'reiziñ tu da'. Diwar seurt ger e c'hallfed ivez sevel troiennoù evel 'bezañ gradek pe hegrad ouzh unan bennak', hag ivez un anvad all evel 'gradekadus'. Skouer : 'hemañ eo ar mare gradekadus' (hetus).

Nnn 54 ARVEVADEGEZH b. - Diwar 'arvevad', 'parasitus' e latineg; "parasitisme" e galleg.

Nnn 54 GOURARC'HIÑ v. - "exiger" e galleg.

Nnn 54 KEMPERZHIATADEZH g. - Kemperzhiadekaat. En destenn c'hallek e lavarer "participation des uns avec les autres" hag en hini latinek 'simul allaborant'.

Nnn 55 SENADEUREZH ENRIEZH - Sioulder, buhez didurmad ar geodediz en o riez. E galleg e lavarer "paix civile", "tranquillité intérieure".

Nnn 56 MAR SAVJE DEZHO MEIZ - 'Sevel meiz da' zo 'dont unan bennak d'encouezañ fraezh pe da vihanañ fraezh a-walc'h'. E galleg "avoir la nette impression". Th a vefe da sevel un droienn all gant an arliv gwanoc'h a glever alies e galleg pa vez lavaret "avoir comme l'impression", 'sevel ardamez da unan bennak'. Gant ar verb 'ardameziñ' e raed gwechall e brezhoneg-pobl evit lavarout "pressentir", "soupçonner" "conjecturer". "Il se doute, il a comme l'impression" eme ar C'hallegerion, 'ardamez a sav dezhañ' a ve mat-kenan e brezhoneg e seurt plegenn.

Nnn 57 KANAÑ DIWAR AN UN SOULDALVEZADUR.

1) "KANAÑ" zo amañ kement ha 'korvoiñ', 'spletif war' ("bénéficier", "jouir", "profiter", eme ar C'hallegerion). E brezhoneg-pobl e c'hall ivez an traoù 'kanañ' pa vez mat ar gont ganto, sk.: 'Kanañ a ra ar patatez' evit lavarout dreist-holl 'gwerzh zo d'ar patatez'.

2) SOULDALVEZADUR g. - Diwar 'soul', 'dreist' ha 'talvezadur'; pezh a ro muioc'h a talvezadur (talvoudegezh ergorel) d'un dra bennak. En destenn c'hallek "plus-value".

Nnn 58 KEVRANNIDI g. - An dud o vont d'ober ar c'hevrannoù war dachenn an nevid, "partenaires" en destenn

c'hallek. 'Kengraourion' e teu ar gevranndidi da vezañ adal ma vez tonket ur mare'had pe ur gevrat bennak etrezo. Da ziforc'hañ diouzh 'kevranneion', "actionnaires" e galleg.

Nnn 58 REIZHDEDUS ad. - o tegas ar reizhded. Ul lezenn reizhdedus n'eo ket ul lezenn reizh hepken, hogen unan o tennañ da lakaat ar reizhded da ren.

Nnn 58 DONABEGET - Abeget ouzh ar bon, klasket abeg outañ betek ouzh ar bon. Reolenn ar frankeskenn eo e klasker abeg outi amañ betek ouzh ar bon, betek ouzh ar gwir eviti da vezout hag evit an denion d'ober diouti.

Nnn 59 DIFERADUREZH b. - Drverkadurezh; "les impératifs", "les exigences" e galleg.

Nnn 59 TREUSREN g. - Diwar Fleuriot 'trog', 'mac'hom'. Ren mac'hom, "dictature" en destenn c'hallek.

Nnn 59 KESINT g. - Diwar Fleuriot 'DECSINTIM', 'asant'.

Nnn 59 GWIRONI b. - 'acquitas' e latineg, da lavarout eo ar reizhded vonel hag anienel diazezet neket war an doujañs e-keñver ar Reizh hepken evel frouezh al lezenn, hogen war ar Gwir, hemañ o vezañ dreist pep Reizh.

Nnn 60 PEUZIKOC'H - 'Peuzik'; diwar Fleuriot 'faut', 'fodic'. En destenn c'hallek "plus favorisé", "plus fortuné".

Nnn 60 O C'HEITLANK - O c'heitlañs, o c'hement a lañs, a chañs. En destenn c'hallek "chances comparables". 'Keitvull' a vefe mat ivez; 'boull' = 'chañs'. Sk. : 'boull ganit' 'chañs vat dit !).

Nnn 60 KEVEZAT ad. - "Concurrentes" en destenn c'hallek. Un diforc'h zo etre 'kevezat' eleze 'neb a vez kevezer' pe c'hoazh 'pezh a vez o kevezañ', ha 'kevezadus' eleze 'pezh a zo gouest da gevezañ, da c'houzañ kevezezh'; "compétitif" e galleg arnevez. Gwell ober gant 'kevezat' eget gant 'kevezel', ger savet fall-daonet, hep diverzegezh ebet.

Nnn 61 AR C'HEVRAOUEREZH HAG AN DARBODEREZH 'KEVRAOUERMEZH' zo kendaelerezh ha 'DARBODERMEZH'

kendaelerezh evit diferañ saviadoù reizhoniell nevez.
'DARBODOUR' a vefe mat-kenan evit kevyezhañ "Diplomate".
En destenn c'hallek 'discussions' ha 'négociations'.

- Nnn 62 RIEZELOURIEZH b. - Riezouriezh eo e gwirionez ar
'gloratio civitatis' a gaver en destenn latinek. E galleg,
siwazh, e vez ezgeriet ar c'heal gant "nationalisme",
pezh a zo forc'hellek-daonet. Setu perak e kevyezhan amañ
gant 'riezouriezh', ur ger o talvoud war un dro 'broad-
elouriezh-aloubiñ' hag 'idolouriezh-stad'. Rak diwar geal
ar Stad ha neket diwar hini ar vroad eo e tinod hevelep
droukreizhiad. Gant ar riezouriezh e weler keal ar
Stad oc'h 'aloubiñ' ivez keal ar vroad. Heñvelster eo
neuz 'riezouriezh' ha 'Stadvroadelourion evel frouezh
houmañ ha hi tamallet gant ar gevreadelourion evel frouezh
put an droukvesk graet gant lies riez, broadoù faos anezho,
etre keal ar Stad ha keal ar vroad. Gant ar riezouriezh
'e vez troc'het ar pobloù diouzh o mad gwirion' gouez d'
ar Fab. Da skouer, tra ma c'hellfe ar vroadelouriezh vre-
zhon dimeziñ mat-kenan gant un urzh kevreadelour (etre-
vroadelour) ne ra ar riezouriezh c'hall, abaoe ma'z
eus anezhi, nemet heugañ ha stourm ouzh hevelep urzh,
enep da vad gwirion he renidi e pep keñver. Gall n'emañ
ket hec'h-unan avat bremañ o vagan seurt gwariadur !
Damanioù steuñvour zoken evel Unaniezh ar Soviedoù a
hañval treiñ mui-ouzh-mui d'ar riezouriezh. N'ouzont
ket magañ gwir gevreadegezh.
- Nnn 62 DIVEDET - 'Divedañ' zo tennañ, sevel u.d.b. uc'h d'ar
bed. "Sublimier" en destenn c'hallek. Ger savet diouzh
skouer unan all anavezet mat evel 'dibradet'.
- Nnn 63 PRODORION - Hervez ar c'hembraeg 'brodor'. Broiz diwar
hil, diwar ouenn.
- Nnn 63 HANBARZHEREZH g. - 'Discrimen' e latineg. Hemañ eo ar
ger gwellañ evit kevyezhañ "ségrégation raciale".
- Nnn 63 E KOUL OUZH - 'E gwalladur ouzh', "en violation de".
Diwar Fleuriot 'CAUL' 'gwall', 'torfed'.
- Nnn 64 O RANBARZHIOU b. - 'Suae cujusque regionis' en destenn
latinek.
Sklaeroc'h eo an arroud latinek amañ eget an hini
gallek gant e "Zônes de développement concerté !"...

Sklaeroc'h ivez bremañ e brezhoneg. Ne ven ket
souezhet e ra meneg amañ ar Fab eus kensteuñvoù evit
diorren rannbarzhioù dezho deurioù heñvel, daoust ma
vezont o c'haoliata harzoù riezoù disheñvel evel m'emañ
kont abaoe pell 'zo evit ar Stadoù Gall hag Alaman gant
Elzas diouzh un tu ha Bade-Württemberg, diouzh an tu all.
Pell emañ zoken ar C'hennevid Europat diouzh gwelout an
diskoulm d'ar gudenn en hevelep doare !

- Nnn 65 GWEREDUSOC'H-GWEREDUSAÑ - Un diforc'h a ran etre 'gvero'h
(ek)' 'efficax' ha 'gweredus', 'efficiens'.
- Nnn 65 ETREDAIC'HIADEGEZH - En destenn c'hallek e lenner "inter-
dépendance dans la collaboration". Ar ger-mañ
zo dezhañ ur ster resis e genou an darvoudourion (diploma-
ted). Arnevez eo an termen. E latineg ez eo troet gant
'mutuo obsequio' 'doujañs keveskemm'. Reizhoniell eo evit
gwir ster ar ger.
- Nnn 65 KENDERC'HAVEREZH GANT UNANGREDEGEZH - E galleg e lenner
"promotion commune sous la responsabilité de
chacun", 'Unangredegezh' zo 'kredegezh an unan'. Savet
eo ar ger-mañ diwar skouer an hini kembraek 'hunangyfri-
foldeb'. Sell. ivez Nnn 34 'unanweredour'.
- Nnn 67 ROUFL g. - Ger da zibab evit treiñ "luxe" en un doare
resis.
- Nnn 68 STUMMADUREZH - Diwar ar gourfenn 'adurezh' e klaskan
kevyezhañ pezh a zo dec'heriet e galleg gant
"culture" hag a vefe gwelloc'h deroet gant "formation",
d.l.e. ar 'stuziadurezh' bastet gant ar Pennskolioù hag
ar Skolioù-Meur hiziv an deiz.
- Nnn 68 PERZHEGEZH b. - Ger arnevez evit treiñ kealioù nevez war
dachenn an arboellouriezh evel "qualification"
e galleg. Gwel. "EMSAV" Nnn9 'gwezhour perzhek' ha 'gwezh-
our gourferzhek'. Amañ e c'hallfed ivez ober gant 'gour-
ferzhegezh' e-lec'h 'perzhegezh dreist'.
- Nnn 70 EMBRÉGENN b. - En destenn c'hallek "entreprise". Ur fazi
eo arverañ bep tro 'embregerezh' evel ma ra
"EMSAV" hep kalz diverzhegezh. 'Embregerezh' zo da gentañ
penn 'obererezh evit embreger tra pe dra' pe c'hoazh
'obererezh an embregerour'. 'Embrégenn' zo heñvelster

- gant 'embregadur', da lavarout eo 'stal', 'greanti', 'labouradeg' e yezh ar vuhez amreizhel arnevez. Heñvel-ster eo ivez gant 'emell' (am eus arveret a-wechoù) evit treiñ gallegachoù evel "affaire", gant ster 'stal' e gwirionez. Da skouer, bez' e klever e galleg : "Une affaire commerciale s'est installée sur la zone industrielle !..."
- Arabat kennebeut kemmeskañ 'kefridi', 'tres', (entreprise, projet) gant 'embregerezh', na kennebeut-all gant 'embreg', 'embregad', 'embregadenn' (initiative) am eus roet ar ster anezho dindan an Nnn 33.
- Nnn 70 KENURZHIEGEZH b. - En destenn c'hallek "sens de l'organisation" hag e latineg 'sagacitas', da lavarout eo 'chem e-keñver ar c'henurzhiañ'.
- Nnn 70 ERLEGEZH b. - Ger henvrezhonek evit lavarout "réciprocité".
- Nnn 70 ANDIAL ad. - 'AN + DIAL'. En destenn c'hallek "impunément".
- Nnn 70 DISREOL ad. - Kreñvoc'h eo 'disreol' eget 'amreol' ha reishoc'h ivez moarvat, peogwir e talv ar ger da liavañ ur saviad enebet ouzh al lezenn reizh (reol), war-bouez terriñ krenn ganti e koul ouzh pep reizhded (dis-reol) ha neket war-bouez he c'hrafignat diwar c'horre hepken, pezh a seblantfe a-walc'h bezañ ster ar ger 'amreol'.
- Nnn 71 GWAREDOURION - Peogwir e reer gant ar ger "assistant" en destenn c'hallek, e kemeran tro evit en kevrezhañ gant 'gwaredour' (diwar ar ger henvrezhonek 'goured' 'skoazell').
- Nnn 72 HINIDIK HA DISKARZHIDIK - "unique et exclusive" en destenn c'hallek. Ster 'hinidik' zo amañ 'troet da c'hoari he hini n'eus nemeti'. 'Diskarzhidik' eo neuze bezañ 'hinidik', peogwir e tennit, o vezañ hinidik, da skarzhañ kuit pep savboent ha pep saviad disheñvel diouzh ho hini ('diskarzhiañ' oa 'troc'hañ gant', 'pellaat!'). Ster 'diskarzhidik' a vez ivez 'argarzhus' alies-mat, ha dres an hevelep ster a gaver ivez gwechavez gant "exclusif" (sectaire) e galleg.
- Nnn 72 SOLWEZ g. - Pevh a ra sol u.d.b. En destenn c'hallek "composantes". Gwelat em eus ivez ar ger-mañ skrivet "seulvez". N'ouzon ket ha mat eo.
- Nnn 73 GWAREDEREZH - Diwar ar ger henvrezhonek 'guorit'. En destenn c'hallek "assistance" (technique). Gwell eo mirout 'kedskor' evit "assistance" (sociale).
- Nnn 74 EMGINNIG DIOUZH - Emginnig evel o vezañ diskibl da u.b.
- Nnn 75 GOURZHELLAT - Kannañ.
- Nnn 76 POBLOU ARZIORREN - Evel 'pobloù war ziorren'.
- Nnn 76 BLEINLUSKAÑ - Kas war-raok, erluskañ.
- Nnn 76 EZVREZEL g. - En destenn c'hallek "absence de guerre".
- Nnn 77 UHELGERC'HELOC'H - O kerc'hat uheloc'h, o tennañ da draoù uheloc'h. E galleg "plus ambitieuses"; e kembraeg 'uchelgeisiolach'.
- Nnn 79 GWERC'HELOURIEZH b. - "Réalisme" en destenn c'hallek. Ger savet diwar ar bonad 'gwerc'hel', hervez doare M. Glanndour pa sav gerioù evel 'gwellaouriezh' ha 'gwash-acuriezh'.
- Nnn 79 ANWAREZ b. - 'barbariezh' hervez an henvrezhoneg 'annguar'. Gwel. Fleuriot 'annguarhaheitic', 'gwar' o talv-out 'seven'. 'Iniquus' am eus troet e lec'h all dre ar ger 'emwar' hervez Fleuriot 'emguer' o tennañ d'an hevelep bonad (guar).
- Nnn 82 BIZENVORADUS - Bivoradus da viken, na c'heller ket ankounaat.
- Nnn 84 MORLOC'HAÑ - Diwar ar ger gwenedek 'morloc'h', 'loc'h bras'. Lakaat loc'h bras er speredoù, da lavarout eo "mobiliser" e galleg, gant ar ster fetis er yezh-se, evit ober d'an dud emouezañ ouzh un talvoud pe un arvar. 'Morloc'hañ' zo neuze lakaat an dud da gemmañ tra pe dra en o buhez evel pobl. Pa vez luadeg ur pobl pe ur vroad evit ar brezel, pe c'hoazh pa vez 'arevezh' (alerte) e-kerzh ar brezel e vez ivez 'morloc'h' hervez ar ster fetis ha difetis.
- Nnn 84 GOURZHTALIEZH g. - Diwar ar verb 'gourzhtaliñ', savet ganin evit kevrezhañ 'affronter' e galleg. Graet gant 'gourzh + taliñ'.



